

Ebrel-Mae 2019 / avril-mai 2019 • niv. 426 • 6,5€

b remañ

Breizh hag ar bed

Kollapsologiezh, fin d'ar pardon



hag ivez > Nicolaas Zannekin > Melioneg > Lennegezh dre gomz

brezhoneg

le magazine pour progresser en breton

bep eil miz / 6 niv. ar bloaz
bimestriell / 6 numéros par an

30€ ar bloaz par an 2,5€ ar miz mensuellement

Anv ha chamliec'h / Coordonnées

Anv / Nom Anv-bihan / Prénom

Chamliec'h / Adresse

Kod-post / CP Kumun / Commune

Pgzi / Tél Postel / Courriel

Koumanantiñ dre chekenn > war anv Skol an Emsav
Abonnement par chèque > à l'ordre de Skol an Emsav

Koumanant bloaz Abonnement annuel > 30€

Koumanant estrenvro Abonnement étranger > 42€

Koum. skoazell adalek Abonnement soutien à partir de 42€

- Koumanantiñ a ran adalek an niverenn nevez embannet
- Je m'abonne à partir du numéro en cours
- Koumanantiñ a ran adalek an niverenn a zeu
- Je m'abonne à partir du prochain numéro
- Ne fell ket din kaout ar prof
- Je ne désire pas recevoir le cadeau

deiziad ha sinadur
date et signature

koumanant bloaz 30€ | e-maez ar C'hwech'hom 42€ | koumanant skoazell adalek 42€
abonnement d'un an 30€ | hors Hexagone 42€ | abonnement de soutien à partir de 42€

- **dre chekenn** war anv Skol an Emsav
par chèque à l'ordre de Skol an Emsav
- **dre internet** e lec'hienn Skol an Emsav ► www.skolanemsav.bzh
Paeañ enlinenn a c'hallit ober gant ho kartenn-vank (PayPal)
- **par internet** sur le site de Skol an Emsav ► www.skolanemsav.bzh
Réglement en ligne par carte bancaire (PayPal)

dre lamadenn vizek ordinal 2,5€ | e-maez ar C'hwech'hom 3,5€ | skoazell adalek 3,5€
Kasit ho favezennoù-bank (DAB) gant ar sammad da lemel dibabet ► An urzh-paeañ SEPA da sinañ a vo kaset deoc'h gant Skol an Emsav

par prélèvement mensuel normal 2,5€ | hors Hexagone 3,5€ | soutien à partir de 3,5€
Joindre un RIB et cocher le montant souhaité ► Le mandat SEPA à signer vous sera envoyé par Skol an Emsav

Da gas da l' à renvoyer à : #brezhoneg, 8 trolec'h Sant-Albin, 35000 Roazhon

PETIT FORTLÉGE de PROVERBES bretons

Koumanantiñ evit ar wech kentañ hag ho po ar prof-mañ!

Ce cadeau de bienvenue pour les nouveaux abonnés!

Levrioù all zo da brenañ e lec'hienn Coop Breizh
D'autres livres en vente sur le site de Coop Breizh
www.coop-breizh.fr

LakMax Kerguel Coop Breizh

Talvezout a rit ar prof-mañ evit le c'houmanant kentañ paes leun hepkenn het betek ma vo echu ar stokoù pe betek an 31/10/2019.
Offre valable pour un premier abonnement à plein tarif uniquement et dans la limite des stocks disponibles ou jusqu'à la date du 31/10/2019.

Bremañ

Kelaouenn vrezhonek savet e 1980 hag embannet bep eil miz gant Skol an Emsav. *Revue en langue bretonne fondée en 1980 et éditée tous les 2 mois par Skol an Emsav.*

8 trolec'h Sant-Albin, 35000 Roazhon
Pgzi : 02 99 38 75 93
Postel : bremañ@skolanemsav.bzh
Lec'hienn internet : www.skolanemsav.bzh

Reneroz an embann

Julie Beaugendre

Pennskridaozer

Samuel Julien

Bodad skridaozañ

Comité de rédaction
Anne Broussot, Gwernael Jéquel, Samuel Julien, Fulup Lannuzel, Millo Latimier, Tangi Legavre

Kemeret o deus perzh an niverenn-mañ :

Ont contribué à ce numéro
Djibriñ Aatf, Arnaud Abdul-Sater, Erwan Aleksanian, Mich Beyer, Anne Broussot, Anton Châtelier, Doran Clerbois, Johan Hellinx, Gwernael Jéquel, Samuel Julien, Karim Laanaya, Fulup Lannuzel, Millo Latimier, Tangi Legavre, P'ar Morvan, Jean-Michel Sarnier, Benead Vernon

Adienn, divankout

Relektour, correction
Anne Broussot, Mich Beyer, Fulup Lannuzel, Millo Latimier

Sekretouriezh-skridaozañ, pajennozañ

Secrétaire de rédaction, mise en page
Millo Latimier

Sekretouriezh

Secrétaire
Christine Guyon

Skouenn ar bajenn 1

Image de une
© Marijus

Moullañ

Impression
Printcorp www.printcorp.fr
6 ball Clémenceau, 22000 Saint-Brieuc

Koumanant

Abonnement
koumanant-bloaz : 39€
abonnement d'un an : 39€
koumanant e-maez pennovro Frañs : 49€
abonnement hors France métropolitaine : 49€
koumanant skoazell : adalek 50€
abonnement soutien : à partir de 50€
koumanant@skolanemsav.bzh

Echu eo ho koumanant ?

Salit ouz an niverenn a-us d'hoc'h anv war ar folien-gas. **Mard** eo an niv. 426, kasit ho pae-amant, dre chekenn war anv Skol an Emsav pe dre gartenn-vank e lec'hienn internet Skol an Emsav, evit kaout an niverenn a zeu.

CPPAP 1116 G 88732 ISSN 0246-5264

Evit kaout an niv. CPPAP eo bet leaset e gallec ar menegoù net er bajenn-mañ ha war ar golo.

Poull-neuil kâr Pripyat m'emañ kreizenn nukleel Tchornobyl, en Ukraina.



Teulad > P.18-23
Kollapsologiezh, fin d'ar pardon

ar gelaouenn

- 4 Soñj & disoñj
Un dibab kelaer embannet e *Bremañ* gwechall.
- 5 Pennad-stur & Kronikenn
Gang ar skridaozerezh ha "N'aus netra skiantoc'h !"
- 30 Lizehoù & kemennadennoù
Kemennadennoù lezeour bet kaset d'ar gelaouenn.

ar bed

- 6 Bremañ er bed
Korfoù yaked en Himalaya, Europa hag ar Mercour.
- 7 Anavezout ar bed
A-vit-bell eo bet broc'het an dud da dreizhañ ar moroù.
- 8-9 Anavezout ar bed
Ar protestantiz e Breizh er 16th ha 17th kantved.
- 10-11 Broioù & pobloù
Nicolaas Zannekin, un haroz fandrozaet.

Breizh

- 12 Bremañ e Breizh
Lioet e oa bet 30 vloaz *La forêt aux croûtes* e Brest.
- 13 Bremañ e Breizh
Ur poltre evit ar stummañ war ar brezhoneg.
- 14-15 Bevañ e Breizh
Ur poltre prim eus kumun Melneig.
- 16-17 Bevañ e brezhoneg
Penaos sevel un emdrom niveroù e brezhoneg ?

► Kemerit pergh !

N'ho peus ket bet ho kwalc'h gant ar pezh ho peus lennet an niverenn-mañ ? Karet ho pije lenn pennadoù diwar-benn traoù all ? Anavezout a rit tud a gas war-raok ul labour pe ur stourm bennak hag a gavfec'h brav reñh da anavezout ? Soñjoù evit an niverennoù da zont, kinnigoù pennadoù-skrid, tresadennoù avelnet gant ar c'helaer, skouadennoù a cheñt kas da Vrezhoñ eveljust. Ma fell deoc'h kemer perzh en un doare don ha padus e cheñt en ober ivez : degemeret e vo a galon vak izili nevez gant Skol an Emsav evit tuskañ buhez ar gelaouenn.

teuliad

- 18-21 Gwirioù ar gollapsologiezh
Tri lev e diazez ar proer war ar gollapsologiezh.
- 22-23 E riski da gouezhañ :
ur stiveñ da faltazi
Maget e vez hor faltazi gant finvez hor sevenadur.

sevenadur, dud, sportoù

- 24-25 Levrioù, arzoù, embann
Un arnez nevez evit al lenneged dra genz ?
- 26-27 Sportoù & yec'hed
Ar seurt, outpern ur sport, un doare bevañ.
- 28 Petra ober, petra gwelet ?
Diskouzasegoù, festoù ha festivaloù da zont.
- 29 Bued
Diaou rekepe gant heñvelan, kouzhoù hag a gaver etrak.



Er rann "Soniñ & disoniñ" e venegomp ar pezh a gaved da lenn e pajennoù ar gelaouenn *Bremañ* dek, ugent ha tregont vloaz zo.



30 vloaz zo > Mezheven 1989 > niv. 93

Proseziou ar brizonidi euskarat

E fin miz Mae 1989 e oa bet devezhioù karget get proseziou ha barnioù evit ar brizonidi en arbenn ag o stourm politikel ha sindikalour en Euskadi. E gwirionez e oa ur mare get ur bern aferioù ha proseziou a-enep stourmourion vroadelour pe dizalc'hour ag an holl vroioù hep statud ofisiel èl e Breizh (FLB, ARB), Korsika (FLNC) ha Katalonia (Terra Lliure) da skouer. Ur miz merket get proseziou Gabriel "Babi" Bidau, Philippe Bidart ha Tottie Etxebeste e oa, en arbenn ag ar pezh a veze graet get ar strollad Iparretarrak abaoe 1973 èl gwaildaolioù dre vombez pe dre oberioù armet. Ur mare diaes-abominapl e oa evit an dud-se get diaezamantoù yched Tottie. Hennezh en doa kollet pemzek kilo hag e oa bet ret el lakaat en ospital goude ar maredad bach. Mezhus e oa gwelet pegen fall e oa graet àr-dro ar brizonidi en toull-bach ha feson ar Stad c'hall da welet ar pobloù a faot dezhe bout dieupoeh. Kudemmoù ag ar seurt-se a choarvez choazh get tud ag Euskadi pe Korsika hag a zo pell a-zoc'h o familhoù, èl e Roazhon lakaomp, get pemp Euskaradez toullbacht a-gaoz d'o stourm evit an emdlderenañ, peotramant dizalc'hour.

20 vloaz zo > Mezheven 1999 > niv. 213

Sinet Karta Europa

Sinet e oa bet karta Europa ar yezhoù minorel get ar Stad c'hall d'ar 7 a viz Mae 1999 (39 miellad a oa bet sinet diàr 98). En niv. 213 e oa bet embannet ur pennad e-keñver an afer-se. Burutellet e veze ar garta er mare-se choazh get emsavourion a-du get ar sinadur kement hag ar re a save a-enep. Hervez tud zo e oa ur fari bras sinañ ar garta peogwir e kave dezhe e oa feson ar Stad c'hall d'ober un arouez hep ober traoù fetis evit ar yezhoù minorel. Hervez lod arall e oa ur gwir spi da lakaat Frañs da sinañ muioc'h a velladoù hag a-benn ar fin kaout muioc'h a sikourioù ha gwirioù evit ar brezhoneg. Siwazh, manet zo ur gouleñn hirv choazh : get piv e oa ar gwir ? Ha traoù zo bet cheñchet en arbenn ag ar sinadur-se ? N'eus statud ofisiel erbet evit ar yezh (er vonreizh ech eus ur meneg, met get peserut talvoud ?), diaes eo deskiñ ha kelenn brezhoneg choazh er skolioù publik a-gaoz d'an diouer a skoaellz argant ha skolioù ar Stad c'hall da roiñ ur plas d'ar brezhoneg e bed ar labour. Ugent vlez zo e oa arvar àr an dra-se. Hirv an deiz, neus den hag a chom etre daou sonj e-keñver an afer-se...



10 vloaz zo > Mezheven 2009 > niv. 332


Kib Frañs mod Breizh, e "ruz ha du"

D'ar 27 a viz Ebrel 2019 e oa get ar maout get Roazhon e kib Frañs a-enep Pariz. Dek vlez zo e oa teulad ar miz e Bremañ diàr-benn ar fobal ag ar vro. Ur mare bourrapl e oa evit ar vell-droad e Breizh peogwir e oa, m'ho peus sonj, Gwengamp ha Roazhon o doa krapet betek ar gourfenn en un aergelch fest. Ruz ha du a veze gwelet pep lech. Kanet ha klevet e veze brezhoneg en dachenn. Er mare-se e oa dishañval mat stad an traoù evit fobal Breizh, dreist-holl evit Gwengamp ha Roazhon. Barrek e seblante bout Roazhon e penn kentañ ar c'hampionad ha Gwengamp, en eil kevre er mare-se, a rae ur brav a zistro e kib Frañs. A-benn ar fin e pignas Gwengampiz betek ar gourfenn a-enep Roazhoniz hag ech eas ar maout gete. Ur gounid ruz ha du er Stade de France, èl ar blez-mañ get trech Roazhon.



Kollapsologiezh : empennañ maru hor sevenadurezh

Pecheñs ho pen : klevet kaoz eus al luskad preder a reer *collapsologie* anezhañ e galleg. En em ledet eo an termen-se dre tamm-ha-tamm, dre levrioù, dre internet, ha kaoz a vez eus se er mediaoù bras bremañ, gant un heklek brasoc'h-brasañ er boblañs. Berzh-bras en deus graet al levr *Comment tout peut s'effondrer* (Seuil, 2015), savet gant Pablo Servigne ha Raphaël Stevens, gant ouzhpenn 45 000 skouerenn gwerzhet, da skouer. Daoust m'eo nevezik a-walc'h birviliñ ar kollapsologiezh ez eo bet hadet pell zo ar mennozhioù a vag ar prederadennoù-se. Danvez an niverenn-mañ eo, "gwizioù" ar kollapsologiezh, ha da gentañ-penn ar studi gourc'hemennet gant Klub Roma embannet e 1972. Dre ma kresk an niver a dud tizhet gant ar mennozhioù-se (kaoz a vez muioc'h-mui eus "anken ekologel" e-keñver yec'hed spered) e teu lvez digompren, disfiz hag enebiezh, ar pezh n'eo ket ur souezh. Empennañ finvez hor sevenadurezh evel m'emañ, avat, zo deuet anatoc'h dre ar mennozh n'eo ket hep bevonn hor planedenn. Kompren ha degemer e c'hell hor sevenadurezh en em zistruj (hag e c'hellomp mervel evel spesad) diindan teulenoù dibleg ar bed a vevomp ennañ a c'hellfe bezañ, hervez tud evel Pablo Servigne, un doare da dremen eus ur sevenadurezh "krennoad" d'ur sevenadurezh en "oad gourc'hemenn". Empennañ ar gwashañ amzer-da-zont a c'hell bezañ un doare da dremen hebioù anezhañ ha mont gant un hent furoc'h. Penaos magañ seurt preder, sevel gouleñnoù direnkus, ma n'eo ket dre ar fallazi ? Skrivagnerien ha filmaozerien o deus pletet gant ar mennozh-se abaoe pell zo, sed aze danvez eil lodenn an teulad. Diawlout hor finvez, kuites da finvezañ diaviz ?




Golo roman Ravage gant Ren e Barjavel, embannet 1943.
skipallh Bremañ

Kronikenn N'eus netra skianteloc'h ! gant Tangi Legavre

Bevañ ha sunañ gwad er vro

Gwenn-kann eo traozhennoù Enez ar Vao! ha ret eo toullañ don evit tizhout an teñzorioù o deus kuzhet moriaeron an amzerioù kent enno. E Breizh ez eus traozhennoù a bep seurt liv, a bep seurt stumm, ha n'eus ket ezhomm da doullañ ken don evit tizhout un teñzor. N'eo ket un arc'h leun a bezhioù aour a glasker dindan gorre an traezh. Pal an imbouc'h eo al leoged. Gwad ar preñved-se a c'hell bezañ implijet e plas hini mab-den peogwir e trouzas an dioksigen en un doare efedus. Pa vo peurechu an enklask teknikel e tiskoulmo hemogloblin ar mor ar c'hudennoù a zeu ingal en hañv pa vank ar gwad en ospitaloù. Saveteet e vo buhezioù e-leizh, Estreged mab-den a c'hellou trugarekaat al leoged. Un disamm e vo evit ar sunerien-wad o devez morc'hed o tennañ gwad dre heg pe dre soupran. Kizidik eo kalz anezho. Ober a reont strivoù evit chom hep lazhañ an dud o deus treuzet o hent e korn teñval ur strada didud. Lod anezho a sun gwad loened zoken, daoust d'an diaesterioù evit o bemvegad esmoliñ. Gellout a rae ar sunerien-wad sevel ur gevellour evit tennañ spleet evit o labour en un doare reizh pa ne c'hell ket ar sunerien-wad labourat war an aod, ken kriz eo ar bannoù-heol evit o c'hroc'henn tanav evel ur parch. Pouezus eo kavout ur c'hempouez a chadenn ar gwerzh ouzhpennet. Un draen a chom bapred. Penaos gouestlañ ur rouedad tachennoù, etre chal ha dical, d'ar sevel leoged ? A-wechoù e vez diaes an daempredoù etre an douristed, difennerien an endro, ar gouerien, ar vartoloded, ar greginaerien, an istraerien, ar vesklaerien, ar valeanterien, ar soudarded hag ar gitesourerien. Den ebet n'eo perc'henn war ar mor. Dalc'homp spi e vo kavet un diskoulm evit brasañ gounid an holl. Ma 'z afe ar soubann da drenkañ, ne vefe ket souezhus gwalet ar bismigerien dantet e-kerzh an noz gant logod-dail ranz. Evit aozañ un diorren padus ha kenget e c'heller kaout fiziñs e skiant vat ar Vretoned. Erru eo poent lakaat er pleustr ur gwir da amodiñ evit cheñch doare terkañ an arvor. Prest eo ar sunerien-wad da bostañ kalz a fontoù war hir amzer pa n'int ket evit mervel. A-benn tri c'hant vloaz o devo adlapeo o fontoù, gant ur c'hampi dereat evit o zrugarekaat eus o fiziñs e diorren armerzhel Breizh. D'ar c'houlz-se e c'hellint kemer perzh diwar o skiant-preden en ur raktres all. Penaos gounit empennañ, prest da vazañ debret, e beolioù hidrokimiek evit magañ ar zombied a vo niverusoc'h-niverusañ gant tommadur an hin ?



John Kalakos of Massachusetts Image distribution for Science and Learning / Creative Commons   4.0

1. Enez ar Vao! La Torue e galleg ha Labbi e breleg Haiti, zo un enezenn em hanternoz da Haiti hag a oa "pennlec'h ar Ribusterien" er 17th kantved.

Indez : kantadoù a gorfoù yaked bet kavet en Himalaya



Ur yak e Sikkim.

Un tri c'hant korf yak marv bennak zo bet kavet er Sikkim, er biz da India, da boent an diskorn, p'edo an erc'h bet pilet stank-kenañ er goañv paseet o teuziñ.

Dre m'edo an erc'h o teuziñ e oa skrijet an dud gant ar spont er Sikkim, ur Stad gwall vihan eus Unaniezh India, er gwask etre Nepal ha Bhoutan. D'ar Sadorn 11 a viz Mae diwezhañ e oa bet roet da c'houzout gant ar gouarnamant e oa bet kavet ouzhpenn tri c'hant korf yak marv en uhelennoù an Himalaya : e-tro daou c'hant hanter-kant anezho er c'horn-bro a vez graet Mugthang anezhañ, war-dro hanter-kant all anezho er c'horn-bro a vez graet Yumthang anezhañ, hervez *The Telegraph*. D'ur pemp familh warn-ugent bennak a vesaerien e oa al loened-se evit doare, ur 4500 metr bennak a uhelder er menezioù. Kaset ez eus bet di ur ski-pailh medisined loened, dezho da vont

war-dro ar yaked chromet bev ahont. An erc'h bet kouezet stank er goañv-mañ a vefe kaoz d'al loened-se bezañ marvet. Hervez un dilemmad eus ar vro-hont, ne vije ket bet roet a-walc'h a voued dezho gant ar vesaerien o-unan. Ha loenedoù o tiaso'hañ dindan ra a erc'h o pouezañ warno a vefe bet kaoz ivez da wari lod anezho, bet friket ha frigasat-naet ! En tu all d'ar piemigou ha digareziou-toull-se e c'helle bezañ ar wirionez, avat. Disklriet eo abet gant al lec'hien geladoù *Voices of Sikkim* e oa al loened-se en dañjer da vervel en abeg d'an amzer o cheñch hag o vont war dommaat. Bos int da vevañ betek daou-ugent derez dindan zero, n'emet diskouezet ez eus bet gant studioù zo eo kresket an temperadur ag un derez hanter e-doug ar 25 bloaz diwezhañ. Rak-se e vefe bet ar yaked-se gwall skolet ha tizhet gant un aser stroñs deut dezho diwar ar gor a c'houzavont e-pad mizioù tommañ ar bloaz, da lavaret eo e miz Mae hag e miz Mezheven ahont. War a lavar Vijay Paul, pennekiantour er Greizenn Vroadel a Enklaskoù war ar Yaked, diazezet er Dirang, eo gouest ar yaked da zalc'her gor o c'horf dre amzer yen-skias, met n'int ket evit freskaat o c'horf o c'hwaziñ pa vez tomm-grizias an amzer. Sed aze 'ta c'hoazh peadra d'en em sonjal diwar-benn hon amzer-da-zont deomp-ni pa weler pegen tomm eo bet an devezhiennoù e derou an hañv en hor bro...

B.V.

Unaniezh Europa : emglev kenwerzhel istorel gant ar Mercosur



Sez ar Mercosur e Montevideo, en Uruguay.

Hag ur respont ouz ar warezouriezh a vefe ? Goude ugent vloaz a vrezel yen war dachenn an enporzhiañ hag an esporthiañ er Mercosur (diwar *Mercado Común del Sur*, "Marc'had Boutin ar Su", savet e 1991) hag Unaniezh Europa. Hogoù 90 % eus an taosoù a c'houllakae an eil kumuniezh armerzhel war eben a vo freuzet.

Hervez ar gazetenn bemdeziek *Clarín* e Buenos Aires eo an emglev-se un touell rak, daoust pegen istorel ha yaek bennak e seblant bezañ, ne c'hall ket tennañ buan Arc'hantina, evel e 1985, eus an enkadenn don m'emañ a-raok pemp pe zek vloaz ac'hann.

Sevel a ra Emmanuel Macron, prezidant Frañs, a-du gant an emglev-se. Spletusoc'h eo dezhañ adskoulmañ darempredoù gant ar Mercosur (Brazil, Arc'hantina, Paraguay hag Uruguay) eget gant Stadoù-Unanet Donald Trump a vez fiziet ennañ nebeutoc'h-nebeutañ gant Euroz. Kement-se en desped d'ar riskoù e-keñver armerzh diabarzh, endro ha yec'hed. Da c'hortoz ez eus un tenn a gevezerezh direizh etre ar greanterezhioù gall ha re Suamerika a arver diastuzierioù hag O.G.K. (organoù genoù kemmet) a-dro-vrec'h.

A.A.-S.

Trema an inizi

A-vil-bell eo bet broudet Mab ha Merc'h-den get an c'hoant da vonet pelloc'h, da dizhout lec'hioù nevez. Kredapl e vehe hon anien, spesad aloubus ac'hanomp !

Hiniv e venn lod sostiñ sol ar morioù pe monet da bianedenn Veurzh, met da vare ar Ragistoer o doa gellet an dud gober beajoù ker souezhus ha ken dañjerus evel pignat get ar menezioù (menezioù an Himalaya a vez darempred get an dud a-werso bras, da nebeutañ 500 000 a-raok J.-K.) pe gerzhet pell a-barzh teñvalded ar groc'hoù. Er pennad-mañ neoazh e vo penngomz ag ar morioù. Hep metal, hep lien, hag hep hor gouiziegezhioù modern o doa gellet an dud kavout ha poblañ Aostralia, a-wael, 50 000 blez kent J.-K., un taol kaer !



Ur gartenn eus Kiprenez.



Livadur ar roc'h en Alta, kontelezh Finmark, Sveden.

tostoc'h deomp e klask an arkeologourion anadoù ag an dud kentañ e Kiprenez er Mor Kreizdouar. Poblet e vehe bet get tud ar-dro 11 000 kent J.-K. Ne oa ket ur veaj dister naket rak nend eus ket a weled d'an enezenn ha pa vezer ar an douar-bras. Penaos o doa graet eta ? Ar hir amzer e oa bet an traoù, en em lakaet e oa an dud da besketa da gentañ hag a-nebeudigoù, a rummad da rummad, o doa tapet un tamm skiant martolod ha diàr-se o doa anavet gwel ar morioù-se, kent gellet kavet ha trevadenniñ an enezenn didud-se.

"DISTUMMET" AN INIZI GET AN DUD

Ouzhpenn daremprediñ an enezenn o doa graet, distummet o doa o bro nevez en ur zegas spesadoù gouez daet a goadoù an douar-bras gete ar o bagoù (evel ar moc'h-gouez pe an demmed). Kement-se a oa e-raok amzer sevel loened, met diskouez a ra penaos e klaske an dud kemmiñ o endro evit ma vehe spletusoc'h ha magusoc'h dezhe. Loened gouez arall a oa bet degaset, met hep goulet dezhe ar wezh-mañ, evel ar logod. Desku eo kement-se a-gaoz ma tiskouez e oa bras

BAGOÙ DIANAV

Aostralia, Breizh-Veur, Japan, Eusa, Korsika, Kiprenez... Ne ouler ket penaos e oa bagoù Oadvezh ar Maen met goût a raer mat o doa tud an oadvezh-hont redet ar morioù gete ha pell a-zouzh an douar bras. Komprenet o deus an arkeologourion e oa bras a-walc'h o listri evit taliñ douzh an donvor ha degas familhoù ha loened gete, ha stank e chome o darempredoù get tud an douar bras.

Anton Châteleur

Evit goulet pelloc'h : *Pré-histoires, la conquête des territoires* get Stéphanie Thébaud ha Jean-Denis Vigne, embannet get Le Cherche-Midi (2018).

Prezeg etre div stêr-veur

Un alberz eus ar brotestantiezh e Breizh er 16^{vet} ha 17^{vet} kantved

Reuz ha freuz a oa bet e Frañs, er 16^{vet} kantved, abalamour d'ar brezelioù relijiel. Ar gatoliked hag ar brotestanted a-dal an eil re ouzh ar re all. E Breizh ivez. En degouezh arvarus-se avat, ar brotestantiezh a oa bleuniet en un douar katolik-kenañ alato. Koulskoude, ne oa ket bet treuzvevet honnezh pell amzer d'ar mare-hont. Seul vui ma oa bet lech'iet-tre he levezon er vro, etre al Liger hag ar Gwilen. Un abeg yezhel, e-touez re all, a c'hallfe displegañ diskararreligion-seurc'hantved diwezhatoc'h.



François de Coligny, aotrou Andelot.

da-heul an Azgvinelezh e oa digoroc'h spered an dud, war ar goulennoù relijiel eta. Ha pa seblante an dra-se bezañ un diachinad, a-benn ar fin. Ne vir ket e voe skignet mennozhioù nevez e pep lech, pe dost, er 16^{vet} kantved en Europa, e Bro-C'hall hag e Breizh. Evel-henn e tiazesas ar brotestantiezh er vro, en ul lodenn resis anezhi dreist-holl. Rak, evel alies, e vez displeget meur a dra pa vez anv eus darvoudoù istorel dre an douaroniezh hag an ekonomiezh; en ur mod, e c'hallfemp lavaret e aesa anezho zoken. Hag, evel alies, ur vegen e he doa pennlusket an Disivoud Meur.

Evit doare, an eskemmoù kenwerzhel dre ar mor, etre Breizh ha broioù all staliet ar brotestantiezh enno c'hoazh (Flandrez, Bro-Saoz), o doa buanaet annezadur ar rangredenn gristen kelennet gant Luther. Kenwerzh an holen a oa bet un elfenn eus ar re bouezusañ evit he skignañ e Bro-Gwenrann ha, ledanoc'h, e Bro-Naoned dre hini ar gwinn. Gouzout a reer e oa bet levezonet-meurbet gant ar brotestantiezh ar pezh a zeulio da vezañ, kalz diwezhatoc'h, al Liger-Atlantel. E lech all e Breizh koulskoude, he deus ar relijion nevez dalc'hidi ivez. E fin 1540 e voe un harlu war-zu Geneva (Suis), kêr Calvin. En dielloù lechel e kaver un daou-ugent anv breizhat bennak. Lod anezho

a zeue eus Gwitreg, lech' kreñv all ar brotestantiezh e Breizh. Dav eo menegiñ avat o doa ar re-se aozioù sokial diouto o-unan, daoust ma oa bet douget ar brotestantiezh gant an noblañsoù.

AR MAOUZEZED ER PENN A-RAOK

Ul lodenn eus ar vrientielezh gounezet d'ar feiz nevez a oa e penn a-raok ar brotestantiezh er vro. Da gentañ gant François de Coligny, aotrou Andelot. Hemañ en em stalias e 1558 e kastell La Bretesche, kumun adstaget ouzh hini Merzhelleg (el Liger-Atlantel) diwezhatoc'h, hag a oa bet ur "post araok" eus ar Roch-Bernez (er Mor-Bihan) abaoe ar Grennamzer. Hervez meur a istorour e verk an deiziad 1558 deroù ar brotestantiezh e Breizh, e su ar Gwilen dreist-holl. Tiegezhioù breizhat skedus all a oa bet stag ouzh ar relijion adreizhet avat, evel hini ar Rochaned da skouer.

Neoazh, ret eo resisaat e veze alies ar maouezed e penn al luskad relijiel, an intañvez pergen, evel Isabeau de Navarre, intañvez Rochan. En he chastell e Blaen (el Liger-Atlantel) e voe urzhiet an iliz protestant kentañ e Breizh, Aze e skedas aotrouniezh Rochan ken he defe gallet mont d'ur Stad ent vihanik. Kement-se a ziskouez un dra bennak all :

kontrol d'ar pezh a vez klevet alies-bras, andonioù ar brotestantiezh ne oant ket tolpet er c'hêrioù bras nemetken. Anv a vez eus "protestantiezh ar manerioù" alato. Brazik e voe levezon ar relijion adreizhet er vro, met bevennet e voe honnezh etre genoù al Liger hag hini ar Gwilen, eus ar Groazig da Vro Gwitreg, tamm-pe-damm. E berr : e Breizh-Uhel.


AR BREZHONEG : UN HARZ DIWELUS ?

Hael e veze kavet un nebeud andonioù protestant e Breizh-Izel ivez : an Henbont pe Pondi (er Mor-Bihan), Montroulez pe Pont-'n-Abad (e Penn-ar-Bed). Istor pennañ ar brotestantiezh a oa bet degouezhet dreist-holl e lech all e Breizh avat. An darvoudoù pouezusañ stag ouzh ar relijion-se a c'hoarvezas e Breizh-Uhel evit gwir, evel kentañ senez proviñsel an ilizoù protestant breizhat, d'an 10 a viz Gwengolo 1561, e Kastell-Briant (el Liger-Atlantel), da skouer.

Perak he doa graet ar brotestantiezh he zreuz e reter ar vro kentoc'h eget er c'hornôg ? Bez' ez eus elfennoù hag a zisplege an dra-se marteze. Div anezho, kenstag an eil ouzh eben moarvat, a seblant bezañ ar re gredusañ. Da gentañ e oa damdost Breizh-Uhel da broviñsoù gall Poatev, Anjev, Maine ha Normandi.

Templ protestant e Roazhon, boulevard ar Frankiz, treset gant ar Brestad Abel Chabal ha peursavet e 1882.

Phymouse / Creative Commons © 0 0 4 0



Da eil, disklêriet e vez e voe ar brezhoneg ur seurt harz hag a viras ouzh ar brotestantiezh da vont war-raok re bell e Breizh-Izel. A-hend-all e c'haller ouzhpennañ n'o doa ket gouezet an emsaverien brotestant en em ober ouzh ar yezh komzet e kornôg Breizh, er c'hontrol da zifennerien ar gatoligiezh a voe e-kreiz an Enepdisivoud a oa d'ar mare-se.

FEULSTER HA DISKAR AR BROTESTANTIEZH ER VRO

Pa voe sioul a-walc'h bloavezh lazhadeg Sant Bartelame (1572) e Breizh e cheñcho an traoù war-lerc'h. Rak nebeut amzer kent Skrid-embann Naoned (1598), e 1585 e stagas dug Merceur ha Pentevr, gouarnour Breizh, da argas ar brotestanted e pep lech er vro. Neus nemet Gwitreg a stourmas da vat d'ar poent-se. Un nebeud bloavezhioù a-raok e vez meneget dija enebiezh e-keñver ar brotestanted amañ hag ahont, e Bro-Gwenrann, da skouer. E lech all, diwezhatoc'h, eo templ Kluneg (Cleusnê pe Cleunay) e Roazhon a voe plantet tan ennañ peder gwech e-kerzh ar 17^{vet} kantved. Mouget e voe ar relijion adreizhet tamm-ha-tamm.

Diwar neuze e oa boulc'het diskar ar brotestantiezh er 17^{vet} kantved e Breizh. Freuzadur Edit Naoned, e 1685, a verkas fin he zremenvan c'horrek. Meur a uheliad protestant breton a zistroas da gatolik, re all a dechas kuit, dre ar mor alies, trema Bro-Saoz peurgetket. Re all c'hoazh a zinachas ar feiz kristen pe a voe toullbacht ken eeun ha tra. Mod pe vod e splujas ar brotestantiezh er morvitelerezh, koulz lavarout, e-pad hir amzer. Da nebeutañ betek an Dispach Gall hag a voe harpet gant an darn vrasañ eus ar brotestanted e Breizh. Un doare all d'enebiñ ouzh ar gatoligiezh ?

Karim Laanaya

Levroniezh :

Histoire de la Bretagne et des Bretons, tome 1 : Des âges obscurs au règne de Louis XIV gant Joël Cornette, embannet gant Seuil (2005).

Musée Protestant : le protestantisme en Bretagne (anlinenn), lemet d'an 12 a viz Mae 2019. Evit gouzout hiroc'h : www.museeprotetant.org/notice/le-protestantisme-en-bretagne/

Du pays de Guérande à la Côte d'Amour gant Marie Rouzeau, embannet gant Palantines (2010).

Protestants et Bretons gant Jean-Yves Carlier, embannet gant La Cause (2003).

A-c'houde 30 vlez ar un ton laouen, ar blasenn Guérin

Bep blez a-c'houde 1989 e vez treuzfurmset tri devezh-pad plasenn Guérin, e Brest, en ur dachenn arvestiñ sevenadurel ha poblek : *La foire aux croûtes* ("foar ar c'hatarennoù"). Bravat anv, ne gav ket deoc'h ? Son ar gouel a vez klevet doc'htu pa vez distaget. Ha petra eo ar foar-se ? Ec'h an da respont ! 'Rit ket bil !



Ur fest sevenadurel ha poblek ar un dro, *La foire aux croûtes* a vez lidet abaoe tregont vlez ar blasenn Guérin, e Brest. Ul levr zo bet savet er blez-mañ evit kontañ istor ar festival dibar-se get an embannadurioù Plage Guérin. © Jacques Bacon

Ar foar a oa bet aozet evit ar wezh kentañ 30 vlez zo get ur skipailh ha na ouie ket er mare-se pegen brudet e tahe da vout an afer evit Brestiz ha Breizhiz. Hrevez Bernard Louedeg e oa bet aozet ur gouel bras evit lidañ kant vlez ar skol Guérin e 1987, get sikour kengor ar gouelioù. Krouet e oa bet ur gevredigezh arall : *Plage Guérin*. Buan a-walc'h e oa daet ivez Ar Vro Bagan hag ur gazetenn e oa daet krouet. La page Guérin... Ganet e oa *La foire aux croûtes* diwar an holl draoù-se. Ar pal d'ar c'houlz-se a oa d'erc'hel ur sizhunad gouel hag a loch get ar c'hermes hag a glot get gouel ar sonerezh. Aozañ darvoudoù sevenadurel get choariva ha d'afis a oa soñj an dud.

Triskell Bar, lech ganedigezh ar foar. Un triskell a chom er blasenn Guérin ur sort, unan bihanoc'h avat. Erfin, pell ec'h omp doc'h hor c'hazeg. Tri devezh-pont Yaou Bask get diskouezadegoù, ur babell hag un ostaleri (ha n'eo ket chañchet re). Berzh en doa graet er charter, bugale é choari e pep lech hag é kemer perzh er "pod-lastez livet ar gwellañ"... Ur charter lan a vuhez (get tud lan o c'hof un tamm, ivez met un afer arall eo...). Chañchet zo traoù a-c'houde elkenet. Aozet ha prientez e vez ar gouel bep blez hag hozoik kant den. Kant plas zo evit ar re o deus choant da ziskouez o oberennoù (tennadenñ d'ar bliouenn-veur a vez graet bep blez a-gaod d'an 300 a dud a faot dezhe en em ziskouez).

foaroù paseet... Hiriv eo chañchet an afer un tammig ; kalz a ostalerioù zo tro-dro (*Le Triskell Bihan, Le Café de la plage, Le Mouton à cinq pattes, Les pissenlits, Le Bouche à Oreille, l'Atelier Gourmand...*) ur gwir vuhez a-hed ar blez ha kevredigezhioù arall zo bremañ ; ur saloñs embann a vez aozet bep blez da skouer, ur marc'had e-tal ar blasenn ha me 'ouia-me. Un ti-karter emveret zo a-c'houde daou vlez ivez, *L'avenir* e anv. Ur forn vara zo ha choarioù, prantadoù trok, predoù *barbecue*, sonadegoù ha festoù-noz a vez aozet...

An holl draoù-se a vez graet get tud ar charter peotrament get tud hag a vourr ar lech-se ha tan enne da lakaat birvilh. Eskemmoù a vez etre ar re yaouank hag ar re goshoc'h ivez... Razh an traoù-se a lak Bernard Louedeg hag ar re arall da lâret e vehe marse ar wech diwezhañ dezhe aozañ ar foar. Mat eo ar jeu bremañ ha marse eo poent lakaat ar re arall d'ober o zraoù ivez get ar foar... Kenavo a-benn blez neuze, perchañs !

Dorian Clerbois

Evit goulet hiroc'h : www.foirauxcroutes.com

HAG AR LIVADURIOÙ ER JEU-SE ?
Er mare-se e oa ur bern livourion a vicher pe amatour e Sant-Varzhin (karter plasenn Guérin). Ur vuhez sevenadurel ha poblek a oa eno dija en arbenn ag ur lech hozoik istorel, un ostaleri hag a zo daet da vout ti un dorloer-eskern hiriv : An

HIRIV AN DEIZ HAG AN AMZER-DA-ZONT
Ag an 30 a viz Mae betek ar 1^{añ} a viz Mezheven 2019 e oa bet an 30^{añ} foar. Un digarez e oa da embann ur levr ispisial a-zivout istor plasenn Guérin ha karter Sant-Varzhin, istor poblek ar charter hag ar foar, skeudennoù graet blezadoù zo er

Stajidi stummadurioù hir war ar brezhoneg kaset gant Skol an Emsav.

Un diplom evit ar stummañ war ar brezhoneg



Ur c'hursus micherel a vo digoret e miz Gwengolo e Skol-veur Roazhon 2 evit mont da stummer ha stummez war ar brezhoneg evit an dud deuet. Fulup Kere, rener ar gevredigezh Deskiñ d'an Oadourien (DAO) a gont hiroc'h.

Piv en deus divizet e oa poent reiñ lañs d'ur seurt stummadur ?
E 2016-2017 e oa bet kaset un Doare Lechel da Ambroug (DLA) gant DAO. Diwar-se e oa bet embannet ur steuñv diorren, War-uz ur gevredigezh divyezhek e fin an 21^{añ} kantved. Stummañ bep bloaz 5 000 brezhoneger en oad a'chann da 2035 hon eus lakaet da bal. Ur sapre difi ! Stummerien hag ur stummadur war ar vicher a vo ezhomm da gaout.

Petra 'oa da berzh el labour-se ?
Kavout un ensavadur stummañ war bedagogiezh an dud deuet a oa d'ober da gentañ. Buan-tre e oa anat e oa dav labourat gant Skol-veur Roazhon 2 ha kevrenn Skiantoù an deskadurezh. Ur stummadur zo eno c'hoazh : an aoteregezh vicherel *Formateur-Conseil-Indépendant ou Salaré* (FCIS). Hugues Pentecouteau, e karg eus ar stummadur-se ha brezhoneger anezhañ, a oa dedennet-tre gant ar mennozh.

Ar bazhvalan 'm eus graet etre skipailh ar Skol-veur ha Burev DAO da gentañ ha gant stummerien ar frammoù ezel prest da aozañ program ar stummadur da c'houde. Kehentiñ ha tuta evit ar stummadur 'm eus graet ivez.

Kaout un diplom a oa un dra a bouez ?
N'eo ket nevez ar vicher ha daoust da se n'eo ket anavezet ! Stummerien varrek-

tre zo e pemp korn ar vro, un tri-ugent bennak anezho. Pep aozadur a stumm e vichereien evel ma c'hell. Kaset e vez ar skiant-prenet eus ur cheñell d'egile met an treuzkas-se n'eo ket framm. Muioc'h-mui a stummerien a vo ezhomm da gaout ha desachañ tud nevez zo d'ober. Reiñ ur gwir dalvoudegezh d'ar vicher stummer war ar brezhoneg a dleomp ober. Kaout un diplom Stad zo a bouez eta, da lâret eo o do ar studierien ar varregezh war stummañ tud deuet.

Penaos e oa bet savet ar programm ?
Ul lodenn eus ar programm, an hini a denn d'ar cheñell d'an dud deuet, zo bet savet gant skipailh kevrenn Skiantoù an deskadurezh Skol-veur Roazhon 2. Al lodenn a denn d'ar brezhoneg zo bet savet gant stummerien eus frammoù ezel eus DAO. Kenurzhiet e vo al lodenn-se gant Anne Brousot, renerez pedagogel Skol an Emsav.

Div lodenn a vo evit ar brezhoneg : ur pazennadur war ar yezh ma vo pouezet kalz war ar gomz ha penaos kelenn ur yezh vinorel hag a vez diaes bezañ "soubet" enni. Tud hag a labour war yezhoù all, kembraeg pe euskareg da skouer, a c'hallfe bezañ pedet ivez.

Penaos e tremeno ar studi ?
Ur stummadur a bep eil e vo. Bep miz e kaso ar studierien ur sizhunvezh er skol-

veur, un eil a vo gouestlet d'al labour hiniennel ha div all evit amproiñ ar barregezh en ur greizenn stummañ pe en ul lech kelenn brezhoneg. Er sizhunvezh er skol-veur e vo tri devezh e galleg ha daou e brezhoneg, tamm-pe-damm.

E galleg e vo al lodenn voutin gant ar re a heuilh ar stummadur gallek. Aze e vo gwelet ar pezh a denn d'ar cheñell d'an dud deuet n'eus forzh pe danvez e vefe : endro an obererezh stummañ, ijnoriezh an emellerezh er stummañ, identelezh vicherel ar stummer, merañ ha diorren ar raktres micher hag ijnoriezh pedagogel an ambroug.

E brezhoneg e vo dielfennet ar skiant-prenet vicherel, labourer war an danvez staj ha pleustret war ar yezh stag ouzh tachenn ar stummañ. Studiet e vo ivez hentennoù kelenn zo ha lakaet ar pouez war al liamm etre ar skrivañ hag ar gomz.

Piv eo an danvez studierien o deus lakaet o anv ?
Profiloù disheñvel zo bet tutaet evit c'hoazh. Ur vrezhonegarezh a-vihanik ha n'he deus ket bet tro da gelenn c'hoazh, ur nevez-brezhoneger krog da gelenn, unan zo war e stummadur hir bepred ur skiant-prenet bras gantañ war ar stummañ... Digor eo an nor : chom a ra plasoù !

Komzoù dasutmet gant M.L.

Evit goulet hiroc'h : <https://dao.bzh>

Poltrered prim

Forzhik a dud a oa bet bodet d'ar Gwener 29 a viz Meurzh 2019 e kêr Melioneg evit selaou prezidant ar C'huzul-rannvro o tanevelañ e steuñv diorren ar c'hleweled breizhek. N'eo ket dre zegouezh e oa bet dibabet ar bourk-se e Kreiz-Breizh avat rak deuet eo ar barrez da vezañ brudet hec'h anv dre ur festival filmoù a vez dalc'het bep bloaz da vare miz Mezheven. Ur gwir arouez politikel e oa kinnig ar steuñv kleweled rannvroel evit an tri bloaz da zont eno rak n'eo ket brudet bed ar c'hleweled evit e zoareoù digreizennañ dre vras, pell ac'hann...



Hent antren e kumun Melioneg.

deuet eo Melioneg da vezañ un arouez all ivez evit ar pezh a sell ouzh c'hoantioù diorren ar parrezioù war ar maez e Kreiz-Breizh dreist-holl, ken ankenius eo ar stadegoù a-zivout amzerda-zont ar bobl er vro-se. Gant gwir abeg rak abaoe un dek vloaz bennak e seblant ar bourk bezañ krog en un nerzh nevez gant obererezhioù ar gevredigezh Ty Films a stourm a-enep ar vuhez "mainstream" er c'hêrioù bras a-vremañ...

UN "TY" NEVEZ EVIT BUHEZAÑ UR VRO

Rezistanted mod nevez war dachenn ar c'hleweled eo izili Ty Films, a-dra-sur. Sofijit 'ta : 95 eus ar goprou staget ouzh ar c'hleweled e Frañs zo lechiet e korn-bro Pariz. E-touesk ar 5% a chom, da lavaret eo un nebeud bruzennoù evit Breizh, e seblant ar c'hêrioù bras evel Roazhon, Naoned pe Brest, dastum

ar restadoù-se. Ur burzhud eo neuze gwelet kement a obererezhioù stag ouzh festival an teulfilmoù e Melioneg rak tost d'un dek den bennak zo gopret gant ar gevredigezh ha lañs bras zo gant o raktresoù. Er bloavezh 2015 e oa bet digoret un ti gouestlet d'an oberourien hag eno e vez roet bod d'ar saverien teulfilmoù, skoazellet e vezont ma karont, eskemmoù ha servijoù e-leizh zo ivez. Daou vloaz war-lerc'h e oa bet digoret un doare adskol war dachenn an arzoù e-kreiz ar bourk, ha stag ouzh Skol-veur Brest. Peadra da zegemer studierien kreiz-kêr Brest evit kinnig stummadurioù pleustrek dezho.

Ur rezistañs all a vez kaset war-raok gant Ty Films, a-enep diskar kriz an niver a annezidi er vro. Daouhanteret eo bet ar boblañs e Korf hanter-kant vloaz, ma n'eo ket rannet dre dri e lec'hioù zo. Pa oa 970 den o chom e Melioneg er bloa-

vezh 1954 da skouer, e oant ken nemet 436 er bloavezh 2016, hervez lec'hienn internet an Ti-kêr. Ar stourm a rank bezañ kaset war dachenn an ekonomiezh ivez dre ma vez kaset nebeutoch-nebeutañ a skoazelloù gant ar melestradur Stad da seurt parrezioù. Kement-se zo bet lavaret gant Jean-Yves Philippe, prezidant kumuniezh-kumunioù Kreiz-Breizh d'an holl berzhidi a oa o selaou prezidant ar C'huzul-rannvro, deuet evit ar wech kentañ e Melioneg, evel forzhik perzhidi an dolpadeg e gwirionez.

AROUEZ AR SPI

Deuet eo an "Ty" da vezañ arouez spi nevez ar barrez a-bezh neuze. Tud all zo deuet, ouzhpenn gopridi ar gevredigezh, sachet gant festival an teulfilmoù hag e spered. Ur stal-voued bio hag ur preti zo bet digoret n'eus ket keit-se hag ur vreserezh vihan anvet Grobul' Factory.

Melioneg



Kinnig ar festival teulfilmoù Melioneg gant dilennidi Kuzul-rannvro Breizh, e-kerzh miz Meurzh.

Peadra da reiñ spi d'ar vaerezh en amzerda-zont nevez ar barrez a-drugarez d'an dud nevez staliet eno... Ha dre gresk an niver a vugale er skol bublik. Deroù un emdroadur pozitivel a vefe hervezi zoken.

POLTRIDI LIES... WAR UN TON HENVEL

Gwir eo ez eus peadra da vezañ souezhet gant al liamm a vez etre an Ty-se ha tud ar vro. Kalzik a dud - 150 ezel a vefe hervez ar gevredigezh - a gemer perzh enni e doare pe zoare ha skignet e vez ingal lod eus ar filmoù e tiez annezidi ar vro. Pal rener Ty Films, Jean-Jacques Rault, e oa e gwirionez rak abaoe penn kentañ ar festival en doa c'hoant da zegas an nerzh pozitivel d'e vro c'hendik. Petra a vefe gwelloc'h evit liammañ ar gevredigezh ouzh annezidi ar barrez eget sevel o foltridi ?

GWIRVOUD PEMDEZIEK

Pevar foltred eus tud o vevañ e Melioneg a vez savet bep bloaz abaoe 2013 neuze. Un doare stummadur evit war ar filmaozñ eo dre m'eo bet sevenet pep poltrered gant un den yaouank disheñvel. A bep seurt tud zo bet poltrered, tud kozh ha yaouank, paotred ha merched, tud bet ganet eno ha tud nevez degouezhet. Berr eo ar poltridi, pemzek munut eo padelezh pep film d'ar muiañ, met peadra zo da reiñ un tañva eus gwirvoud pemdeziek Melioneg : hunvreoù ar re yaouank, hiraezh ar re goshoch, red prim an amzer evit an dud deuet lakaet dindan ar wask da vont a-gleiz hag a-zehoù ha pa vefe evit bevañ nemetek... Fromus mat eo lod anezho ha peadra zo da gompren buhezioù kemplezh an dud zo o vevañ eno.

UR YEZH TAVET

Siwazh deomp, ur rezistañs all a seblant

bezañ aet da get er vro-se. Hini ar brezhoneg. Blev er gevredigezh, warbouez en anv Ty Films. Blev er barrez, warbouez an anv Melioneg. Ha koulskoude, pa vez sellet ouzh poltridi tud zo er barrez e kompren buan ez eus c'hoazh peadra da glevet ha traoù all, dibar, da lavaret, sur a-walc'h. Santout a reer da skouer e oa c'hoant bras gant Yvette da lakaat ar gaos diwar-benn doareoù speredal ha glizoù dibar he bro, pe c'hoazh anaoudegezh divent "Bondieu" diwar-benn he endro, pa vefe an natur pe an dud. Ne vezont ket klevet diwar-benn an anaoudegezhioù-se. Ne vez ket klevet sevenadur Melioneg ken, pe a-boan. E-giz pa vefe Melioneg ur barrez bennak war ar maez e Frañs, ordinal, dister, evel pa vefe n'eus forzh parrez all e gwirionez. Saveteet e vo Melioneg marteze, met daoust ha saveteet e vo hec'h ene ?

Samuel Julien

Evit gouzout hiroc'h :
www.tyfilms.fr



Sevel un emdroer niveroù brezhonek ...pe klask pemp troad d'ar maout niverel

Petra eo un emdroer niveroù ? Un emdroer niveroù zo, e bed an urzhiataerezh, ur meziantig - pe ur makro' zoken - hag a emdro an niveroù skrivet e sifroù en o stumm skrivet e lizherennoù. Kemeromp ur skouer : lakaomp e skriv un implijer "27", klikañ a ra war ar bouton "emdreññ" ha dao ! Adskrivet an niver er stumm "seizh warn-ugent" gant an emdroer, diboan. "Diboan" emezoc'h ?

Pep yezh a zegas an amproù nevez d'ar mekanikoù, ha ne dremen ket ar brezhoneg hebiou d'ar reolenn-se, rak perzhioù dibar zo d'hor yezh evel a ouz. Un emdroer niveroù a vefe un ostilh da ziorren evit ar brezhoneg, met luzietoc'h a galz e vefe eget unan graet evit ar galleg. An dra-se n'eo ket ken anat-se, klasket e vo gwelet penaos ha perak. Pa gaozeer eus sifroù ha niveroù ne genglot ket atav ar pezh a gaver e brezhoneg gant ar modoù kentañ er yezhoù all. E-se e vo ret sevel meur a zoare is-emdroer niveroù e-barzh ar meziant brezhonek hollek. Gwelet e vo un nebeud reoù. Ur wech ma vo staget gant sevel ur meziant egistañ e teulo un nebeud reoù all da ouzhpennañ ha na oa ket bet soñjet enno.

➤ AR MODÙ DA GONTAÑ DISHENVEL ORDINALAN HAG AN EMDROER
E galleg e challer kavout meur a stumm kentañ diouzh bro an dud, da skouer ar mod ma konter e Suis, e Kebek hag e Belgia, met an dra-se n'eo netra e-keñver an holl zoareoù kentañ dishevel evo en

hor yezh-ni. E brezhoneg eo kalz-kalz luzietoc'h an afer. Bez' ez eus meur a zoare kentañ e brezhoneg, ha ret mat eo doujañ ouzh an dud a implij stumm-pe-stumm, hep barn, hag an dra-se eo ar pouezusañ, e-pad re bell ez eus bet enebled etre ar vrezhonegerien.
Stagomp gant an doare kentañ kentañ an hini "klasel", pe "hengounel", gant an unanenn dirak an dekedennel : eizh hag hanter-kant. Estreget ar mod-se da gontañ zo. Tud a ra gant un doare all, kemeret ganto ur mod simploc'h hervezo : hanter-kant-unan. Lod, marteze ar memes re, o deus adimplijet ur stumm kozh da gontañ hag a zo chomet bev e-barzh ar ger tregont ha lavaret e vo e-se : "pennant unan" ganto evit "unan hag hanter-kant". Setu ma vo ret sevel tri chorpuz diazez, da gontañ. Rak ret e vo doujañ ouzh an holl ezhommoù zo gant an holl. Ur wech ma vo savet ul lec'henn hag un astenn evit ma c'hallfe an dud implijout ar pezh zo bet graet e vo ret soñjal en doareoù envel evit ma vefe dispartiet-naet hag aes da anavezout ar modoù kentañ gant an holl, gwelet e vo an dra-se un tammig diwezhatoc'h.

➤ DIAESTERIOÙ HAG A C'HALL DONT PA GONTER TROAD
Ar mod ma chomer hep lakaat al liester goude ar sifroù hag an niveroù bihan zo ur c'hemm all etre ar brezhoneg hag ar galleg. Alet e vez heuliañ ar reolenn-mañ er yezhadurioù : gant an niveroù bras e ranker implijout un "a" skoazell ha war e lerc'h e laker al liester. Kemeromp evel skouer : "2 100 175 a dud" a ro "daou vilion kant mil kant pemzek ha tri-ugent a dud". Kalz diaesoc'h e vefe bet gouzout pelec'h lec'hiañ an unanenn aze ma vefe bet kontet gant mod an unander : "daou vilion kant mil kant pemzek den ha tri-ugent."
Ar gudenn eo n'eo ket gwall sklaer adalek peseurt mare e krog da vezañ bras un niver. Daoust hag-eñ e vefe niveroù deuet da vezañ "difetis" en ur mod, pe re luziet, setu e vefe aesoc'h kentañ gant an "a"-se ? An niveroù bras n'int ket par dirak ar matematikoù hag an niveroù, evit-se n'eo ket gwall sklaer adalek peseurt poent e vez sklaeroc'h ober gant "a."

Kavout a reer ar sistem-se evit un sammad bihan a draoù kontet koulskoude, er chanaouennoù pobl da skouer : "Pemp war ar bank, pe'r ergwele, a rafe nav a vugale" (kanaouenn : *Ar bloaz paseet*). An "a" a vo un draen evit an emdroer niveroù neuze. Da lavaret eo e vo ret sevel ur c'horpus evit kentañ hep an "a" skoazell, hag unan gant an "a" skoazell, ar pezh a ro dimp "pemp a gorpuz" betek-henn.
Evel pa ne vefe ket trawalc'h a gorpuzoù da sevel, bez' ez eus un dra all zo heverk d'ar brezhoneg. Ar mod ma niverer pe ma petveder traoù en urzh. An anvioù-kadarn niveriñ a echu gant un -ed, hag ar gerioù petvediñ a echu gant -et, da skouer : *ugentvet* (anv-gwan petvediñ) *kantved* (anv-kadarn). Daou gorpuz all war ar marc'had, nav anezho a vo ur wech en em gavet amañ.

➤ DALC'H AR SISTEMOÙ KONTAÑ IMPLIJET NEBEUT
Ar mod hengounel da gontañ e brezhoneg a gont dre ugent, an dra-se a zo anat. Ar pezh n'eo ket anavezet kement-se eo ar mod ma talc'her da

gontañ gant ar sistem-se a-us da gant, mont a reer gant ar mod-se da gontañ betek nav ugent. Hag ur c'horpus all da ouzhpennañ c'hoazh. Setu ma'z eus dek korpus da sevel.
Modoù kentañ raloc'h a vez gant tud zo c'hoazh. E-lec'h lavaret "mil pevar chant naontek ha pevar-ugent" e lavar lod "mil pemp kant nemet-unan". Hag ur c'horpus ouzhpenn, unnek anezho hon eus betek bremañ.
➤ PERZHIOÙ DIBAR-RIK AR MOD DA GONTAÑ E BREZHONEG
Luzietoc'h e teu da vezañ an traoù gant ar mod dibar-mañ zo da gontañ e brezhoneg : kentañ hervez jener ar pezh a gonter. "Daou/div", "tri/teir", "pevar/peder" : ret e vo doublañ kement korpus diazez zo, daou gorpuz warn-ugent en holl, ha disoñjet ez eus bet sur-mat ouzhpennañ un nebeud elfennoù dibar d'ar brezhoneg ha ranket hor bije ouzhpennañ korpusoù all... Ar gudenn bennañ evit an emdroer da gontañ traoù gourel/benel eo e rankfe bezañ krefivaet an emdroer evit gellet gouzout jener ar

ger a gonter. Ret e vo dezhañ bezañ liammet ouzh un difazier reizhskrivadurel ha yezhadurel efedus ha disi, hag un dalc'h all e vo merañ ar c'hemmadiurioù er gerioù a gonter... Penaos e troio an traoù evit ar gerioù hag a vez gourel gwechoù zo ha benel gwechoù all ? Petra 'vo ret ober ? Kinnig div linenn gant pep a zisoc'h ? Lakaat un evezhiadennig "alet/implijetañ" evit diskouez pehini a vez kavet ar muiañ ? Kalz muioc'h a c'houlennoù eget a respontoù a sav e fin ar gont diwar labour aozañ ur meziant hag a seblant d'ar c'hentañ gwei bezañ eun a-walc'h da brogrammiñ. Daou droad warn-ugent zo bet kavet d'ar maout niverel-se, da vichañ !
Pêr Morvan
(ezal eus ar gevredigezh An Drouzdig)

1. Ur makro a zo ul sistem urzhiataer ennolet hag a genglot gant ur gevrid-labour hag a rank bezañ graet alies a-walc'h gant un urzhiataer. Gellout a ra bezañ emc'hraet al labour gant an urzhiataer goude-se.
2. Kentañ, kentañ traoù, kentañ traoù pe tud en urzh, kentañ an amzer, ma vez gourel pe benel ar ger a vez kontet.
Evit gouzout hiroc'h : www.drouzdig.org

Gwrizioù ar gollapsologiezh

Deuet eo da vezañ brudet-kenañ, ha diouzh ar c'hiz eo abaoe nevez zo, ar ger "kollapsologiezh"¹ er mediaoù. Petra an diaoul zo a-dreñv an afer-se, emezoc'h ? Netra nevez e gwirionez. Abaoe ar bloavezhioù 1970 ez eus bet skiantourien oc'h embann labourioù sirius a ziskouez pegen nec'hus eo stad ar jeu evit hor sevenadurezh vedel.

Ar gollapsologiezh, diwar ar ger *collapsologie* e galleg flour, zo un doare skiant, pe un doare da soñjal kentoc'h, hag a laka asambles teoriennoù ha studioù skiantel liesseurt evit klask kompren penaos e c'hallef kouezhañ en e boull sevenadurezh mab-den, staliet bremañ er bed a-bezh. Dont a ra ar ger *collapse* e galleg eus ur ger latin a dalvez kement ha gwantañ en un taol. Penaos e c'hoarvez an traoù, petra a c'hallfemp ober evit padout pe chom bev, peseurt tu psikologel dibab, penaos asantiñ d'an afer, setu danvez ar gollapsologiezh hag ar gollapsologourien...

Soñjit ta, ur bed ma n'eus danframmet abet ken war ur skeul vras, ur bed hep

eoul-maen na tredan, ennañ nebeutoc'h a voued hag a zour mat da evañ. Brezelioù pe gleñvedoù o dije lazhet ul lodenn vras eus ar boblañs. Ne vije ket ken er bed-se eus an urzhiaeroù nag eus ur bern teknologiezhioù uhel all kennebeut. Setu marteze ar pezh a c'hoarvezto etre ar bloavezhioù 2020 ha 2030 a-hervez labourioù sirius savet gant skiantourien zo, evel an danevell *The Limits to Growth*² (1972). Kouezhañ a raio en e voull hor sevenadur bedel. Ma ! Penaos ha pegoulz, aze emañ an dalch, avat.

Ken niverus eo ar sinoù fall hiziv an deiz ma vez nec'het-bras kalz a dud an tamm desket. Ganet e oa ar gollapsologiezh neuze.

Klub Roma

Klub Roma zo un gozadur bedel savet e 1968 boulet emañ skiantourien, pemou embregerezhioù, mestrouerien ha politikerien. Tud eus 52 Stad zo ennañ. Krouet e voe goude karczadennoù en OCDE diwar-bann diaesterioù ar gevredigezh voden ha deroù un enkadenn hollek. Pal ar c'hlub eo kas soñjoù ha savboentoù nevez e pemmoù an dud. An emvod kentañ a voe e miz Ebrel 1968, e Roma. Dont a reas brud d'ar c'hlub goude embann danevell Meadows e 1968. E kêr Winterthur, e Suis, eo diazezet Klub Roma hiziv.



© National Geographic Society



Ur blastenn straed e Pariz peget warni unan all gant anv an enklaskerez Donella Meadows gant izili "Osez le féminisme."

TRI LEVR


A-hed bloavezhioù an hanter kantved diwezhañ, lakaomp abaoe ar bloavezhioù 1970, ez eus bet embannet tri levr a bouez, ha brudet, diwar diskar ar sevenadurezhioù. Drezo e vez komprenet mat a-walc'h eus petra zo kaoz dindan ar ger kollapsologiezh. Koulskoude, petra an diaoul a dalvez "diskar ur sevenadur" ? E gerioù berr, hervez an arbennigourien ez eus tri dezverk a bouez : ret eo kaout war un dro un digresk poblañs, un digresk produadur labour-douar hag un digresk produadur greantel. Da c'houde e c'hall an traoù c'hoarvezout goustadik pe buanoc'h.

LEVR KENTAÑ : THE LIMITS TO GROWTH HA BEYOND THE LIMITS

Al levr brudet-se anvet *The Limits to Growth*, da lavaret eo "harzoù d'ar c'hresk" a voe embannet pell zo dija, e 1972. Moulet e voe pevarzek milion a skouerennoù gant Klub Roma. Savet e oa bet gant Dennis Meadows, Donella Meadows ha Jørgen Randers, klaskerien eus an MIT anezhe.

Diazezet e oa ar studiadenn-se war ur fed na c'haller ket nac'h ken bremañ. Kresk ekonomikel ar bed bremañ, da lavaret eo kefiusker ar sevenadurezh abaoe ur c'hantved hanter, a heuilh ul lezenn ekspontantel : an niver a dud, an ekonomiezh, ar

Golo *The Limits to Growth*, embannet e 1972.



pourveziou tennet eus an douar, ar boued, an t'reou, ar produadur greantel. Al "louchad ekologel" e berr, evit ober gant ur ger "glas". War un tu all, emañ ar pezh a vez anvet "barregezh sammañ" ar blianedenn, *carrying capacity* e saozneg.

Pa vez tremenet dreist barregezh sammañ an Douar gant al louchad ekologel en ur heuliañ ul lezenn ekspontantel e c'hoarvez ar pezh a vez lesanvet un distremen (*overshoot* e saozneg, *dépassement* e galleg) [s.o. ar grafiek 1, p. 20]. An distremen-se a c'hall bezañ disheñvel-mik hervez an doare ma vez meret an traoù. Gallout a reer kaout distremennoù biotoc'h heuillet gant un digresk hag a ya goustadik pe distremennoù a-herr gant un digresk trumm do heul. Un distremen kreñv a dalvez kement ha diaesterioù drastus evit mab-den : klievedoù-red dre ar saotradur, brezelioù evit

ar pourveziou retañ evel an douar hag an eoul-maen, ha diwar-se lazhadegoù niverus ha kement zo.

Efedoù bras zo, gwall anavezet c'hoazh, hag a ziskouez n'emaomp ket pell diouzh ar savad-se : tommadur an hin, distruj liesseurted an natur, ar saotradur hollek, ur chevandir plastik e-kreiz ar Meurvor Habask ha bremañ e Mor Kreizdouar... Hir-spontus eo ar roll.

Donella Meadows, Dennis Meadows ha Jørgen Randers a oa ekonomourien ha bevniourien. Savet o doa ur patrom urzhiaerezh anvet *World 3*, gant un tamm mousfent du marteze. Gwelet e vez en emdroadurioù-se un distremen hag un digresk a zeu buan pe goustadikoc'h hervez an dezverkoù, evel hini poblañs ar bed da skouer.

Patromoù urzhiaerezh

Gant kresk galloud an urzhiaeroù bremañ e vez graet gant patromoù urzhiaerezh war dachennoù skiantel niverus evit klask kompren un dra bennaket, ha pa vefe traoù bihan pe traoù bras. Arbennigourien an hin da skouer a lak da dreiñ patromoù kemplezh evit diwelout penaos e troio an traoù. Resisoc'h-resisañ e teu da vezañ o sell war an amzardazont. Dezrevell ar GIEC zo diazezet war seurt studiadennoù kaset da benn er bed a-bezh ha kañveret an eil re gant ar re all. Pa vez anv eus diazont mab-den ha n'eo ket eus an hin hepken ez eus bet aozet patromoù urzhiaerezh gant skiantourien zo. Daou anezhe zo deuet da vezañ brudet a-walc'h : ar patrom *World 3*, meneget a-us, hag ar patrom *Handy*.

Ar patrom *World 3*

E 1970 e oa bet savet ar patrom *World 1* gant Jay Forrester, ur enklaskour eus an MIT. E 1972, gant embannadur an danevell *The Limits to Growth* e oa bet diazezet ar patrom *World 3* diwar *World 1*, krouet gant ur skipañ skiantourien all eus an MIT, Donella ha Dennis Meadows en o fenn. Diazezet eo ar patrom war ataladoù diforc'hat hag a laka da c'hoar asambles kementadoù hag a cheñch, evel hini ar boblañs vedel, produñ al labour-douar, produñ an greanterezh, ar saotradur, ar pourveziou. Resis a-walc'h eo ar patrom hervez ar sanario dibabet.


Ar patrom *Handy*

Ar patrom *Handy* zo deuet da vezañ brudet nevez zo dre ar gzaetmerien evit bezañ bet krouet gant an NASA. Emañoc'h eo eget ar patrom *World 3* ha n'eo ket ken resis kennebeut. Diazezet eo war ur patrom prezhou-prezherien hag un nebeud ataladoù diforc'hat all tennet eus skiant ar bevniourien. Ar breizherien eo an denien, ar prezhioù eo an danvezioù naturel. Tres pannañ ha kentelusañ ar patrom-se eo an doareoù disheñvel da aozañ ar gevredigezh, gant hag ar skouerioù termet eus sevenadurioù aet da get. E berr, seul digredigezh ha gozadur ar gevredigezh, seul wastioch e tro an traoù. Ar patrom-se a glet mat ivez gant studiadennoù Jared Diamond an e levr.

E 1972 ne oa ket bet tremenet c'hoazh dreist barrezh sammañ ar blanedenn gant louchad ekologel mab-den, ha kinniget e oa bet gant ar skiantourien hentennoù da lakaat er pleustr evit cheñch penn d'ar vazh. Siwazh, nevezete voe ar studiadenn e 1992 gant Donella Meadows dindan an anv *Beyond the Limits*. En he danevell nevez e tiskoueze Donella Meadows, en desped d'he zro-spered gwelweler, penaos ne oa ket bet cheñchet penn d'ar vazh abaoe 1972 hag an dibasete ma oa barrezh sammañ ar blanedenn penn-da-benn. Ar gwashañ eo marteze e oa bet muzullet ganti an emroadour etre 1972 ha 1992 ha keñveriet gant senarioù disheñvel. Gwellet he doa e klote splann an emroadour gant ar senario *Business as usual* ("kresk evel boaz") jedet gant ar skiantourien el levr kentañ. Hervez ar senario-se e tigreksfe poblañs ar bed adalek 2030 eus eizh miliard betek tizhout pevar miliard e 2100. Pell emaoimp diouzh diouganou Aozadur ar Broadoù Unanet (ABU) a ro bepred 11,2 miliard a dud a-benn 2100! Peadra zo da vezañ nechet bras hag aze emañ an dalch. Evit an ABU e vo diskoulmet pep tra dre vuzhuzh an arakaat skiantel, dre ijin mab-den, ha mat pell zo... Biskoazh kemend-all! Perak ober bilou?

Aet eo Donella Meadows d'an Anaon e 2001. Dennis Meadows a gendalch-ehñ da foetañ ar bed evit prezegenñ. Hervezhañ eo echu ar lev bremañ, re ziwizhañ eo evit ober tra pe dra. Teorienn an diorren padus zo ur farsite evitañ.

E gwirionez, ar pezh a ziskouez ar patrom urzhiaerezh *World 3* eo e vo ur gudenn vras buan a-walc'h, a-benn ur gudenn vloaz bennek d'an diwezhañ, hag abretoc'h marteze, etre 2020 ha 2030. Hag afevus e vefe ar patrom-se evit diouganou ur pratand resis? Gwellet e vo, moaien zo da dabalut etre arbenignourien. Neus ket pell e oa bet embannet gant an aozadurioù diawelout (pe dervantñ) bedel pegoulz e vefe bevenn produñ diwezhañ an eoul-maen. E 2025 e c'hoarvezfe an traou, n'ik evel bevenn an distremen er patrom "kresk evel boaz" jedet gant ar skiantourien. Gwellet e vo penaos e troio an traou, koulskoude, danevell *Beyond the Limits* a ziskouez mat eo echu penn-da-benn mare an tregont vloaz kresk goude an Eil Brezel-bed, ha dont a raio a-dra-sur ur pratand arvu-soc'h dre ma n'eo ket divevenn ar c'hementad danvezioù er bed evit bevañ mab-den. Krog eo ar pratand-se c'hoazh hervez kalz tud [s.o. ar grafikoù, p. 21].





EIL LEVR :
COLLAPSE: HOW SOCIETIES CHOOSE TO FAIL OR SUCCEED GANT JARED DIAMOND

E 2005 e oa savet gant Jared Diamond *Collapse: How Societies Choose to Fail or Succeed*. Penaos e tegouezh d'ar chevre-digezhioù padout pe mont da get? Berzh bras a reas al levr-se, ha brud vras en deus bepred. Un oberenn veur eo e gwirionez. Jared Diamond zo douaroniour ha fiziologour. Un den a skiant-prenet eo ivez gant e labour evit embregerezhioù bras war dachenn merañ an efedoù war an endro. Studiet pizh e oa bet meur a sevenadurezh vihan pe vras gantañ, a-hed an amzer dremenet pe vremañ hag un tamm pep lech war an douar, un dek bennaket e gwirionez. Anv zo el levr eus sevenadurezhioù modern evel re Montana, Rwanda ha Sina kement hag eus sevenadurezhioù kozh, evel ar v-Mayaed, Indianed Amerika, tud Enez Pask, ar Vikinged e Gruneland ha re oadvezh Tokugawa Japan. Pep hini eus ar chevre-digezhioù-se a oa bet ret dezhi talañ mod pe vod da ziaesterioù bras en o endro evel sechorioù, dourerier beuz, dreist korvolñ ha kement zo. Lod zo chomet bev, lod all zo gwanaet kalz ha re all c'hoazh zo kouezhet en o foull. Klask a reas ar skiantour kompren ar pennoz hag ar perag. Martezeadenn gentañ Jared Diamond eo e teufe disoc'h mat pe fall ar chevre-digezhioù eus o dibaboù hag o doareoù mat pe fall. Kiriek e vefe ar sevenadurezhioù eus o zonkad, dre vras. Tost kant pajenn zo gouestlet el levr da henvidi Montana ha da Enez Pask. En eil lodenn ez eus kaoz eus penaos e

oa aet da get kevredigezhioù zo, hag en trede lodenn eus penaos eo padet lod all. Er pevare lodenn e teu ar preder. Daouzek gourdrouz evit ar sevenadurezhioù zo dibunet gantañ: distruj an amez naturel hag ar choadoù, koll ar boued gouez evel ar pesked, distruj liesseurted an natur, distruj an douaroù gant al labour r-douar, dreistimplij an energiezhioù, an dour fresk foranet ha louzet, koll energiezh an heol, saotradur an endro, efed ar spesadoù aloubus, efed ar c'hementad CO₂ en aergelch war an hin, kresk ar boblañs, brezelioù pe diaesterioù etre ar chevre-digezhioù gant ar chevre-digezhioù uhel o diorroadur hag ar re n'int ket gant an hevelep live. Ledan ha don eo ar studiaden. Da c'houde ez eus bet dielfennet. Da keñveriet pemp dezverk etre ar sevenadurezhioù: gwalloù graet d'an endro, c'heñchamant an hin, an embregerezhioù hag an dud evit ma c'helle ar chevre-digezh bedel padout. Sevel a ra kinnigoù, fazioù da dremen hebiou dezho evit ar re o deus ar galloud, hag evit ar re all ivez. Un oberenn veur eo al levr hep mar ebet. Ar chabistr diwar-benn istor an Enez Pask zo souezhus ha dispar. Koulskoude, ret eo sevel ur goullenn a bouez e-keñver al levr-se. E-barzh ar sevenadurezhioù vedel evel hon hini, emeur pell-pell diouzh hini Enez Pask pe diouzh pep skouer kemeret el levr. Ha gouest e

Ar senario "kresk evel boaz" gant ar patrom World 3 ha kadarnet betek 1992



Golbadoù lennoù Jared Diamond ha Lester R. Brown.

vefe ar sevenadurezh vedel en he fezh da vont war un hent mat evit an holl?

TREDE LEVR :
B4 PLAN, MOBILIZING TO SAVE CIVILIZATION GANT LESTER R. BROWN

Savet e oa bet al levr-se e 2009 gant Lester R. Brown, un agronomour brudet er bed a-bezh. Gantañ e oa bet skignet ledan, evit ar wech kentañ, ar soñj e oa marteze ur si bras e doareoù an ekonomiezh, betek kas ar bed war-zu distruj an endro hag ar bed dre ur gresk eksponantel. Mod-all, setu ul levr pozitivel a-walc'h en ur mod, pa vez keñveriet gant an daou all, dre ma klask ar skrivagner tresañ pe difraostañ un hent evit an amzer-da-zont. Div lodenn gentañ al levr a ya da daolenniñ stad ar jeu. Kaoz zo enno eus an difioù bras zo dirak mab-den ha diazezet int war an daou levr meneget a-raok. An daeaden gentañ a denn da wisk kresk eksponantel ar boblañs war ar bed hag an efed war an douaroù, ar boued, an dour hag an endro. An eil difi eo tommadur an hin dre an energiezh produet ha diazezet war an

eoul-maen. Dre an daeaden-se e teu tri zra: ur geopolitikezh diazezet war an douar a voued, diaesterioù brasoc'h-brasañ e diabarzh ar Stadoù (soñj'it ta en enkadenn ar Jilettennoù Melen) hag etre ar Stadoù (soñj'it ta en India ha Pakistan), muoc'h-mui a repudi a vefe abalamour da ziaesterioù an endro hag abalamour da abegoù all c'hoazh. War-lerc'h ez a teir lodenn all al levr da sevel kinnigoù evit diskoulmañ an traou. En trede lodenn e tres un hent evit diskoulmañ kudenn vras tommadur an hin dre c'heñchamantoù meur en doare d'ober gant an energiezh. Er pevare lodenn e teskriv penaos sevel keriou evit an dud ha kaout doujars ouzh an endro war un dro. Er pempet lodenn e tispleg penaos skarzhañ eus ar bed paourentez hag an diforc'hioù pinvidigezh re vras etre an dud. Un tamm re wellaour eo al levr marteze, siwazh. Ret eo bezañ gwelweler un disterig memes tra, koulskoude... Da skouer, en trede lodenn e tiskouez penaos, dre grennañ ar CO₂ diasoaket en aergelch eus 80% pe war-dro, e c'hallfemp mirout un dregantad CO₂ en aer-

gelch dindan 400 lbm (lodenn dre vilion) e 2020. Allas, tizhet eo bet an treuz-ze e 2018 hag aet mat en tu-hont zoken, gant 413 lbm. Ret eo gouzout e soñj'it d'an darn vrasañ eus arbenignourien an hin e vefe ret dimp chom dindan 350 lbm evit tremen hebiou ur c'heñchamant hin efedoù bras dezhañ.

SENARIO AN TITANIC: PEP HINI WAR E BESK

Petra eo an hent dibabet gant mab-den evit c'hoazh? "Senario an Titanic" a vez graet anezhañ gant Brown. E berr, ret e vo da bep hini tennañ begig e spilhenn. Evel-se o doa graet tud an Titanic. En em ziluziet e oa 97% eus an dud pinvidik ha 55% eus ar re baour eus gwallzarvoud 1912.

Jean-Michel Sanner

1. Kollasekologiezh, diwar ar ger gallek *collapsologie* savet diwar ar saozneg *collapse* (sevel, distruj) ha *logos* (skouer), gwerzhañ disoc'h "Gwan-touriezh" a c'helle bezañ graet eus sa e brezhoneg ivez neuze.
2. Ur sturim PDF eus embannadur 1972 an danevell *The Limits to Growth* (e saozneg) a c'heller kroui digoust, dre tec'henn internet *The Donella Meadows Project*. Evit gouzout hiroc'h: <http://www.limits-to-growth.org>

Un amzer nevez evit al lennegezh dre gomz ?

Pouez ar gerioù a c'hell levezoniñ kalz hon doare da welet ar pezh a c'hell hor sevenadur bezañ. E galleg e vez roet d'ar ger *littérature* ur galloud dreistment. Sakr eo ar gerioù skrivet ha dispriziet ar gomz allies-mat. E brezhoneg e vez implijet ar ger *lennegezh* ha lenn a dalvez kement ha tremen dre ar skrid neuze. Siwazh, techet eo bet ar vrezhonegerien da heuliañ roudoù al lennegezh e galleg, da lavaret eo reiñ muioc'h a dalvoudegezh d'ar skrivañ eget d'ar gomz ha kement-se zo bet gwelet a-hed an 20^{vet} kantved. Koulskoude, an emdroadur teknologel kement hag ar c'hoant da vont war-zu hentoù arzel nevez a c'hell aotren ac'hanomp da grediñ e vefe marteze erru ur maread nevez evit hol lennegezh...

dibaoe un toullad mat a vloavezhioù, e vez priziet muioc'h-mui ar pezh a reer anezhañ "al lennegezh dre gomz" e Breizh. N'eo ket dre zegouezh mard eo bet savet an droienn-se - *littérature orale* e galleg - gant ar skrivagner Georges Sand pa oa o lenn *Barzhaz Breizh* bet dastumet ha kempennet gant Kervarker.

LEVRIOÙ AL LENNEGEZH DRE GOMZ

Anat eo deomp neuze pegen prizius eo al lennegezh dre gomz evit hor sevenadur. Oberennoù all estreget *Barzhaz Breizh* a vefe da ouzhpennañ, ha pa vefe oberennoù Fañch an Uhel ha kalz re all. D'ar mare-se avat e talveze al levr evel an doare nemetañ da zerc'hel soñj eus ar pezh a veze klevet gant an dastumerien. Implijet eo bet al levrioù neuze evel ur benveg mat da enrollañ hol lennegezh dre gomz ha kement-se betek donedigezh ar rolloù-koar er bloavezh 1900. Daoust ma oa bet tennet silet eus an emdroadur teknologel buan a-walc'h gant an dastumerien, ez eus bet kendalc'het e-pad pell d'ober gant

stumm al levrioù, da lavaret eo ar skrid nemetken, evit derc'hel roud eus al lennegezh dre gomz. Digredapl eo, da skouer, ne vefe ket bet ur stumm da glevet gant embannadur paper *Barzhaz Breizh* hag a zo anavezet evel penn-oberenn hol lennegezh dre gomz koulskoude. Ret eo bet gortoz ar bloavezh 1999 evit lakaat an dra-se en e reizh, da lavaret eo tost ur c'hanved war-lerc'h an enrolladennoù mouezhiou kentañ war goar ! Diniver eo al levrioù bet embannet er memes mod a-hed an 20^{vet} kantved hag a ra anv eus al lennegezh dre gomz hep he reiñ da glevet. E-giz pa vije a-walc'h gant ar stumm paper nemetken...

LEVRIOÙ "DAOU STUMM" GANT AR GOMZ O REÏN HARP D'AR SKRID

Cheñchet ez eus bet penn d'ar vazh da gement-se avat. Hag ar c'ontrol a vez kavet hizviken. Levrioù al lennegezh dre skrid a vez embannet ingal gant ur stumm klevet. Abaoe pell e vez kavet embannadurioù seurt-se pa vez kaoz eus al lennegezh evit ar vugale pe ar yaouankiz dre vras. Pep levr embannet

gant TES evit ar yaouankiz en deus ur stumm klevet, da skouer. Ur striv bras a vez graet ivez war dachenn-se gant an embannadurioù Kelt Vimp Bev ha Sav-Heol hag a ginnig pellgargañ enrolladennoù dre internet evit gellel selaou lennadenn ar skridoù. Ur gwir labour klok tro-dro d'an embann "daou stumm" (paper ha son) ha divyezhek a oa bet boulc'het gant an embregerezh staliet e Brest, Numéribulles. Dre ur sistem koumanant miziek e veze roet an tu da gaout kontadennoù dindan stumm ul levr ha da bellgargañ o zoare kontet dre gomz diwar o lec'hien. Aet eo ar stal da stalig, siwazh.

Ouzhpenn ar yaouankiz a c'hell tennañ gound eus ur stumm klevet. Hiziv an deiz eo niverusoc'h-niverusañ ar pezhioù-choari (*Distro pe Re an tu all*, da skouer), an danevelloù (*Straed ar sechedien pe Anken*) pe ar barzhonegoù (re Yann-Bêr Piriou) a vez embannet gant ur bladenn. Kinniget e vez ivez gant lod eus an embannadurioù all (ar gelaouenn *#brezhoneg*) danvez klevet.

Talvoudus-kenañ eo seurt kinnigoù evit an tiez-embann. An darn vrasañ eus tud

ar vugale skoliataet en hentadoù brezhonek n'anavezont ket hor yezh koulz lavaret. Aesoc'h eo d'ar vugale selaou brezhoneg eget lenn brezhoneg, ouzhpenn. Efedusoc'h eo neuze kelenn ar yezh d'ar re vihan kenkoulz ha d'an dud deuet. Daoust da se, ne vez ket dalc'het kont ez ofisiel eus ar stumm klevet pa vez kaoz eus sikour an embann. Chom a ra diazezet ar skoazell war ar paper nemetken, ar pezh a c'hell bezañ ur skoilh evit diorren ar stumm klevet, talvoudus evit ar vrezhonegerien kement hag evit an danvez brezhonegerien.

UL LENNEGEZH HAG A YA WAR ZIFETISAAT ? DRE GOMZ, DRE SKRID HA DRE SELLET ?

Koulskoude, war vrasaat ez a ar c'hoant da ginnig obererezhioù nevez - e brezhoneg pe e yezhoù all - obererezhioù dibar ha dispar dre ar son. Tud Teatr Piba, da skouer, o deus kinniget pezhioù-choari troet diwar an italianeg pe ar saozneg ha kinniget int bet dre ar son nemetken (*Teir-oberenn ar peñse*, *Ar maizioù* pe c'hoazh *Paotr e valzenn*). N'int ket pezhioù bet azasaet evit ar radio

nemetken. Un doare all da leurenniñ zo da gaout evit ur pezh-choari dre ar son : pa vefe an trouzajoù, ar sonerezh pe ar c'hoari dre ar mouezhioù. Ne oa tamm kinkladur ebet evel en ur c'hoariva hengounel, daoust ma oant bet c'hoariet dirak arvesterien e-giz ur pezh-choari ordinal. E-keuz ar jeu emañ ar son ha pa vefe aozet ar pezh-war-eeun, evit arvesterien staliet dirak al leurenn-choari kement hag evit ar selaoerien radio. Ne oa bet embannadur ebet dindan stumm ul levr, avat. Tremen dre ar son a ranker evit tañva an oberennoù-se. Gant ar memes tro-spered emañ tud Teatr Piba o sevel *Donvor*. Ur gwir genlabour etre Iremet hag ar strollad teatr an hini eo, evit klask liammañ an enklask skiantel hag ekologel gant ar c'hrouñ arzel. Nebeut a dra da arvestiñ outañ e gwirionez, met ur bern traoù da glevet avat, dre ar c'harthennoù-post heklek' bet embannet war o blog da skouer !. E galleg e vez renet ar produñ met n'eo ket bet disoñjet ar brezhoneg evit kelo-se, ha pa vefe gant titl ar pezh.

Estreget war oberennoù Teatr Piba e c'haller lakaat ar gaoz. Gant al labour bet

renet gant an embregerezh IN8 hag e oberenn *Piv'neus lazhet Lemaure* ? e vez mesket bannoù-treset, skrid, son ha kieweled. Un oberenn liesvedia eo, kinniget d'ur publik yaouank, el levraouegoù-mediaouegoù peurlivañ. N'eus ket kaoz eus lennenen pe arvesterien ken aze, ez danvez enklaskerien zo o fal dirouestañ ar muntr ne lavaran ket ! N'eo nag ur c'hoari video nag ul levr, nag un oberenn glevelled rik kernebeut. Ur meskad "lies-oberenn" ne lavaran ket, ha kement-se e brezhoneg hizviken.

SKOAZELLAÑ MUIOC'H AN EMBANN DRE GLEVET ?

Neoazh, o welet pegen pinvidik ez eo bed an embann e brezhoneg - hag hervez ar stadegoù n'eo ket bet morse ken pinvidik - n'eo ket prest al levrioù da vezañ diliet. Ha gwell a se ! Met peadra zo d'ar em soñjal : daoust ha ne vefe ne vefe ket erru ar c'houlz da ambrog muioc'h ar seurt oberennoù nevez-se e brezhoneg er mare-mañ ? Mare an distro eus al lennegezh dre gomz marteze a-walc'h...

S.J.

1. Evit gouzout hiroc'h - <https://donvorblog>



Abadenn enrollañ ar pezh-choari dre glevet. Teir-oberenn ar peñse (2018) gant Teatr Piba.

Ar seurf war gwagennoù dour sall

Hiziv an deiz e seurf mui-pe-vui an holl, ar reoù yaouank kement hag ar re fur, war gwagennoù elektronek ar Genrouedad, peg un darn anezhe o bizied ha paret o selloù ouzh skrammoù o "nay-Phone" (pe "iMobil" - gant "an dro id" pe get). Kaoz 'vo amañ eus ar seurf "giz kozh", avat !

Seurfiñ : deuet eo ar ger-se da vezañ ordinal e-touesk an dud, hag implijet forzh pegement, a-hed hag a-dreuz, e bed ar bruderezh ivez... Achanta !
Eus ar seurf war ur plankenn em eus choant da gaozeal, hini war gwagennoù dour-sal degaset gant houll ar Meurvor Atlantel.
OUZHPENN UR SPORT, UN DOARE DA VEVAN
Sot-nay on gant an arz-se, bet un tañva anezhañ pemp bloaz zo bremañ war aodoù Norzh Gwaskogn, er Medoc. Plankenn-ruilh ha *bodyboard* am boa bet tro d'ober a-raok, e Breizh, un tamm mat a amzer zo bremañ.


Din-me ec'h eo ar seurf ouzhpenn ur sport. Ur gwir vedisinerzh, ur mod da vevañ ha da vezañ an hini eo, un doare d'ober gant elfennoù an Natur ha da zoujañ oute : kas an dour, barradoù avel pe grizilh zoken e-kerzh ar goañv.
BEZAÑ FUR HAG UVEL
Fur hag uvel e ranker bezañ eta evit gouzout betek pelec'h e c'haller mont : treitour eo ar mor. Re-wir eo evit an neb a soñj dezhañ bezañ krefivo'ch evitañ...
Diaes e c'hall bezañ a-wechoù, dreist-holl en deroù pa vezer o teskiñ. Kalonek eo ret bezañ : derchel penn, dont a raio, dre sellet, dre ober !
A-raok mont dezhi e ranker sellet pizh

ouzh an dud zo o seurfñ. Kement-se a ziskouez penaos 'mañ ar jeu : aezet pe get ? P'en em gaver en ul lec'h dianav eo furoc'h goulnenn digant tud ar c'hornad penaos e tremen an uhelvor pe an izelvor eno. Ha kas dour zo gantañ ? Pelec'h ez eus kerreg ? Un digarez eo d'ober anaoudegezh gant tud pijus war un dro !
Un tu eo ivez da dostaat d'an evned (gouelaned, morvrini...) ha d'ar reuniget a seblant souezhet bewech oc'h arvestiñ ouzh abadennoù dañs war vor ar seurf-erien gwisket e du.
UR SPORT HINIENNEL... D'OVER GANT TUD ALL
Lâret e vez gant darn eo ar seurf ur sport

"hiniennel". Gwir eo ha koulskoude ar pezh a gont da'm soñj eo al lamm etre an dud en dour ha kaout plijadur e-leizh o c'hoari gant ar gwagennoù asambles... Tizh dezhi ! Pouezus eo en em saludiñ a bep tu, reiñ kalon an eil re d'ar re all, reiñ e c'hourc'hemennnoù d'unan bennaik, frealziñ ar re o devez doan, doujañ ouzh ar reolennoù hag ouzh ar reoù all. Skol ar vuhez, kuita ?
Pa gomañs ur wagenn da zifarleañ e c'hell en ober war he zu kleiz pe war he zu dehoù, a-wechoù war he hed, ar pep gwellañ e gwirionez. An hini tostañ d'ar poent difarleañ (ar "barr", *pic* e galleg ha *peak* e saozneg) emañ gantañ ar gwir da dremen. Gant-se ma tarzh ur wagenn war he hed e c'hall bezañ seurfet gant

daou zen. Da bep hini da lâret d'egile petore tu 'vo dibabet gantañ : kleiz pe dehoù ?
Evel gant ar skrivañ ez eus daou rummad seurf-erien : kleizidi ha dehouidi. Ar re a vez o zroad kleiz war benn a-raok o flankenn a reer *regular* deuzoute hag ar re all 'vez graet *goofy* deuzoute.
REGULAR, FRONTSIDE, BACKSIDE...
Pa seurf ur *regular* war-gaout an tu dehoù en em gav e gof a-fas d'ar wagenn : lâret e vez emañ *frontside*. Pa 'ch a war an tu kleiz en em gav troet e gein ouzh ar wagenn : kement-se a vez graet *backside* anezhañ neuze. Pa vezer deraouad eo kalz aezetoc'h c'hoari

anezhi *frontside* peogwir e weler kostez ar wagenn o tarzhañ. Tamm-ha-tamm e kustomer hag e teuer a-benn da seurfñ *backside* : evel-se e taper muioc'h anezhe ivez !
KAOUT E WALC'H A SANTADURIOÙ
Tu kleiz pe tu dehoù, ar pezh a gont eo kaout e walc'h a santadurioù. Pouezus-mat eo sellet tro-dro evit gwelet hag-eh ez eus tud all en dour tostoc'h ouzh an aod avat, kuit da vont a-benn enne. D'an hini savet war e blankenn da vezañ mestr war ar pezh a ra... Sañset ! Amzer zo, pep hini d'e dro hag evit pep hini e vo !
Erwan Aleksanian



Yun e Traezhtaal, Bro-Dreger, ya 'vel !
Roc'h-tran-Tag Gwenn
pedoc'h adrekañ.

Brest

Yaouvezhioù ar porzh



Etre ar 25 a viz Gouhelenn hag ar 15 a viz Eost e vo kinniget sonadegoù hag arvestoù-straed bep Yaou e stern 31st Yaouvezhioù porzh Brest. Lakaet e vo an ton ar an diorren padus hag ar ar monedjeter evit an dud nammet. Digoust ha digor d'an holl eo an danvou.

Evit gouet hiroc'h :
www.brest.fr

Douarnenez

42nd Gouel ar filmoù



Etre ar 17 hag ar 24 a viz Eost e vo dalc'het 42nd Gouel ar filmoù e Douarnenez. En taol-mañ e vo Aljeria, hag an Algerianezed dreist-holl, e-kreiz ar jenn rak d'net a rano un nebeud anezhe da lakaat ar gaoz ar o ferzh er brezel dieubiñ ha traoù arall.

Evit gouet hiroc'h :
www.festival-douarnenez.com

Pempoull

Kan ar vartoloded



Abaoe 1989 e vez aozet festival Kan ar vartoloded e Pempoull. Ar blez-mañ e vo dalc'het etre an 2 hag ar 4 a viz Eost. P'emañ ar festival get ur spered etrebroadel e vo gwelet strolladoù ag ar bed a-bezh eno. Bilhedoù e rakwerzh zo da breñhi dre lec'hienn ar festival.

Evit gouet hiroc'h :
www.paimpol-festival.bzh

Bro Naoned

Emgavioù an Erzh



Ëi bep blez abaoe 1987 e vo dalc'het festival Emgavioù an Erzh a-hed ar stêr-se adalek an 28 a viz Eost betek an 1st a viz Gwenholon. Mard oc'h sot get ar jazz na chomit ket etre daou : digoust e vo !

Evit gouet hiroc'h :
www.rendezvouserde.com

Sant-Maloù

Hent ar Rock



Etre ar 14 hag ar 17 a viz Eost e vo dalc'het koulzad hañv festival Hent ar Rock e Sant-Maloù. Ëi boaz e vo kinniget strolladoù sonerezh a bep sort (ur playlist zo da gavet ar lec'hienn internet ar festival). Un dachenn gampañ a vo digoret d'ar berzhidi ivez.

Evit gouet hiroc'h :
www.laroutedurock.com

Roazhon

50 vloaz Skol an Emsav



Un hanter kantved zo e oa bet savet Skol an Emsav ! Lidet e vo kement-se e Roazhon d'ar 4 ha 5 a viz Here. Ur film get Yowan Denez diar-benn istor "SAE" a vo skignet, un devezh preder a vo diarbenn ar c'helenn d'an dud deuet en amzer-da-zonet ar yezh... Muioç'h a ditouroù a vo skignet a-raok pell.

Evit gouet hiroc'h :
www.skolanemsav.bzh

Parpillhotad pavezioù eog gant hedledan



sk. F. Andrieux / Ubidex, Vues Bourmies

Anavezout a rit Plantago major ha Plantago lanceolata? Eya sur, ma lavaran kement-all deoc'h e brezhoneg ! Hedledan ha louzaouenn-ar-pemprouddenn a vez graet anezho, e pep lec'h war ar maez e kreskont, ha da liorzhoerien zo e talvezont labour c'hwennt dibaouez... hag amer. Ha padal d'an neb a venn e c'hellont bezan darnvez priziaus evit ozañ meuzioù saouus ha yaoc'h. Gwelomp 'ta penaos implijout o delioù.

aozennoù

- 4 favez eog
- 4 dormadig fer glas
- 4 gwerennad laezh



grouad G

aozañ

1. En ur gokellenn pe ur gastelodenn tev he foñs, skuilhit al laezh yen hag ar fer ha lakait da virviñ war dan bihan. Lezit da yenañ.
2. En ur girin, ledit an hanter eus an delioù, lakait ar pavezioù eog warno. Tu ar c'hroc'hien a vo lakaet war ar gorre.
3. Skuilhit ar meskad fer ha laezh, ha gwiskit gant nemoran an delioù.
4. Goloit ar girin. Ma n'ho peus golo ebet a vent ganti e c'hellit implijout ur follenn paper aluminium stardet mat tro-dro dezhi.
5. Enforgnit ha lezit 45 munut pe 1 eurvezh, gant ar gwrezevker lakaet da 150°/180° (5/6).

Mich Beyer

Tartezenn linad hag hedledan

Hag un dibenn-pred lipous gant drauklouzoù? Oc'h ober gaop emañ-me, 'mit-hu? N'emañ ket! Sellit kentoc'h:

aozennoù

- | | |
|--------------------------|---------------------------|
| toaz bresk | 1 loaiaed mel |
| 200 g delioù linad fresk | 30 g rezin sech |
| 100 g delioù hedledan | 50 g poultr kraoc'h-kevez |
| 3 vi | 20 g sukr rouz |
| 25 cl laezh | |

aozañ

1. Tremptit disparti al linad hag an hedledan e-pad 10 munut en dour gant gwinegr, riñsit ha dizourit.
2. En ur gastelodenn vras, poazhit al linad, goude 10 munut dizourit ha tremenit anezho buan dindan dour yen evit mirout o liv. Sec'hit gant paper kegin.
3. En ur gastelodenn all, poazhit an hedledan en dour berv, cheñc'hit an dour hag adpoazhit 5 munut evit skarzhañ ar c'hwervder (pa vez yaouank ar plant r'eo ket dav ober). Dizourit ha sec'hit gant paper kegin.
4. Meskit an daou seurt delioù ha drailhit anezho.
5. En ur saladenouer, basit ar vioù gant al laezh hag ar mel, ouzhpennit an delioù drailhet hag ar rezin sech, meskit mat.
6. Strewit ar poultr kraoc'h-kevez war an toaz ledet, skuilhit ar meskad ha, mar karit, kinkit gant bandennoù toaz moan.
7. Lakait er forn raktommet (180°/6) ha lezit war-dro 30 munut. Klouar pe yen, ul gwir lip-e-bav !

M.B.



© mrsandrieux

Emañ skipailh **Bremañ** o klask kenlabourerien nevez begred, brezhonegerien gouest da bleidiñ gant danvezioù liesseurt. N'ho peus ken nemet kas ur getig da: brem@skolanemsav.bzh

Evit gouzout hiroc'h pe koumanantiñ d'ar gelaouenn:
www.skolanemsav.bzh ha pajenn Facebook **Bremañ**

#44BZH #DECIDONSËNBRETAGNE



NOZOMP UR REFERENDOM EVIT DIVIZOUT E BREIZH!
On veut voter!
NANTES / NAONED
15 H 00 28/09 3 e GM
Miroir d'Eau Melezour Dour
Devant le Château Dirak ar C'hastell

LA COORDINATION DÉMOCRATIQUE DE BRETAGNE

Manifestadeg e Naoned


Evit diskouez e venn un darn eus Breizhiz ha Breizhadezed kas war-raok unaniezhezh melestradurel ar vro ha kreskiñ ar c'hendiviz demokratel e Breizh e c'hallv Kenurzhladur Demokratel Breizh da vont da Naoned da vanfestiñ d'an 28 a viz Gwengolo 2019 evit brudañ mennozh ur referendom evit lakaat ensavadurioù melestradurel da emdreiñ.

Evit gouzout hiroc'h : www.facebook.com/Coordination.Democratique.BZH

Redadeg 2020

Factañ a ra deoc'h prenañ ho kilometr e Redadeg 2020? Lakaet e vo ar gwerzh enlinenn er pleust adalek miz Here pe miz Du 2019. Ewekent, pelgargañ a c'hallit ar bilhed-prenañ bremañ ha skrivañ warnañ e pelec'h e fell deoc'h lec'hiañ ho kilometr. Kemaret e vo ho titab e kont gant skipailhoù lec'hel ar Redadeg.

Evit gouzout hiroc'h : www.ar-redadeg.bzh



Al Liamm - Tir na nÓg

Ar gelaouenn sevenadurel e brezhoneg

Bep eil miz: 130 pajenn gant danevelloù, barzhonegoù, studadennoù diwar-benn ar yezh en literezh, ar skingenerien, komadennoù levrioù (diwar yezhoù a bep seurt, nevezenti tiez-embann Breizh, notennoù kalester diwar-benn ar pezh a c'haarvez e brezhoneg e Breizh.

35 € ar bloaz (stumm niverel 15 €)

>> Koumanantiñ! <<

Evit gouzout hiroc'h pe koumanantiñ d'ar gelaouenn:

Labourzo

Ur berweg espar zo bet savet gant zili an Ubabar. Labourzo e anv Ul lec'hienn internet eo, digor d'an holl, evit strolañ ar c'hinnigoù hag ar goulennoù labour, ur "pôle emploi" brezhonek en ur mod. Penabliñ a ra fichennoù kinnig-labour (postoù brezhonek pe divyezhek) ha fichennoù brezhonegerien hag a zo o klask labour. Ouzhpenn 300 den (implijerien ha klaskerien labour) zo enrollet evit bremañ.



Lennit bremañ!

Breizh hag ar bed

39€ ar bloaz
6 niverenn
32 bajenn



Dibabit etre tri doare da baeañ ho koumanant da **Vremañ**

► **dre chekenn** koumanant bloaz 39€ | e-maez pennvro Frañs 49€ | skoazell adalek 50€ war anv Skol an Emsav

Règlement par chèque à l'ordre de Skol an Emsav, accompagné des coordonnées de l'abonné-e.

► **dre internet** koumanant bloaz 39€ | e-maez pennvro Frañs 49€ | skoazell adalek 50€ e lec'hienn Skol an Emsav ► paeañ enlinenn a c'hallit ober gant ur gartenn-vank (PayPal) e www.skolanemsav.bzh

Règlement sur internet par carte bancaire (PayPal). Rendez-vous sur www.skolanemsav.bzh

► **dre lamadenn viziek** ordinal 3,25€ | e-maez pennvro Frañs 4€ | skoazell 4€ kaset ho taveennoù-bank (DAB) gant ar sammad da lemel dibabet ► an urzh-paeañ SEPA da sinañ a vo kaset deoc'h gant Skol an Emsav

Règlement par prélèvement mensuel. Joindre un RIB et cocher le montant souhaité. Le mandat SEPA à signer vous sera envoyé par Skol an Emsav.

Anv ha chomlec'h an den koumanantet | Coordonnées de l'abonné-e

Anv|Nom.....
Anv-bihan|Prénom.....
Chomlec'h|Adresse.....
Kod-post|CP.....
Kumun|Commune..... Bro|Pays.....
Pgz|Tél..... Postel|Courriel.....

...ha gwiskit STERED™!

www.stered.eu

Koumanantiñ diouzhtu-dak hag e profo **Bremañ** deoc'h ur rochedig Stered.

Ya, fellout a ra din kaout ur rochedig Stered gant ma c'houmanant da v-**Bremañ**.

T-shirt evit ar baotred
ment: S M L XL XXL

T-shirt evit ar merc'hed
ment: S M L XL



Talvezout a ra ar prof-mañ evit ar goumananterien nevez hepken, betek ma vo echu ar stokoù. Pezhioù-dihad Stered profet betek an 31 a viz Here 2019. T-shirtoù evit ar baotred, pemp ment: S, M, L, XL hag XXL. Top evit ar merc'hed, pevar ment: S, M, L hag XL. Liv ha skrid ar rochedigoù a vo diouz ar stokoù.

► **da gas da: Bremañ - 8 trolec'h Sant-Albin - 35000 Roazhon - Breizh**

Ar folenn-mañ a c'hall pelgargañ diwar al lec'hienn internet www.skolanemsav.bzh



Skol an Emsav

1969

2019

Lid 50 vloaz

Gwener 4 a viz Here

> 4bis

Istor Skol an Emsav

Ur film gant Yowan Denez

Produet gant Frañs 3

Taol grenn

Gant obererien istorel SAE

Sadorn 5 a viz Here

> Ti ar c'hevredigezhioù

Kendiviz

« Adperc'hennañ ar yezhoù
dre ar c'helenn d'an dud
deuet »

Gant perzhidi eus Breizh,
Euskadi, Katalonia
hag Okitania

E Roazhon